

K A I E R O U

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G

=====

K A I E R N° 6

Kala Mae 1970

.....

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages : 10 F.

C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper)

Lodenn Ia.- PREFASOU (da staga ouz "Pedennou ha Lidou an Overenn")
41-49

Azvent I ha II - War ar pemdez e-doug ar bloaz -
Pantekost - An Dreinded - Sakramant an Aoter - Ar Galon Zakr -
An Aotrou Krist Roue - An Ebestel - Sant Jozef -
Sant Yann Vadezour - Dedi eun Iliz - Santez Anna -
Ar Zent - Ar Zant a zavas an eskopti.

Eil Lodenn.- SKRITUR ZAKR EN OVERENN, HAG OREZONOU
..... 1-23

Seizved sulvez Pask	1 - 5
Sul ar Pantekost	6-10
Gouel an Dreinded santel	11-14
Gouel Sakramant an Aoter	15-18
Gouel ar Galon Zakr	19-23

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 28 a viz ebrel 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

SKRITUR ZAKR EN OVERENN - Kaier n° VI -

- 1 -

Bloavez B (1970)

.....

SEIZVED SULVEZ PASK

Lennadenn Ia.- Tost goude m'eo bet Jezuz pignet d'an
.....
neñv, sant Vazeaz a zo dibabet da abostol

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (1/15-17, 20c-26)

15. En deiziou-se, e-kreiz an diskibien bodet niveruz,

- war-dro c'hweh-ugent e oant -

Per en em lak en e zav hag a gomz evelhénn:

16. "Va breudeur, bez' e ranke c'hoarvezoud

ar pezh a zo merket er Skritur Zakr:

ar Spered Santel, dre henou David, e-noa lavaret pell a oa doare Judaz,
an hini 'zo bet o tiskouez an hent d'ar re a dapas krog e Jezuz;

17. bez' e oa unan ahanom, ha perz e-noa en or harg.

20c. Skrivet eo e levr ar Salmou:

Ra vo unan all da gemer e garg.

21. Red eo eta dibaba e-touez ar wazed a zo bet d'on heul

hed-ha-hed an amzer m'edo Jezuz o veva ganeom,

22. adaleg badiziant Yann beteg an deiz m'eo bet savet kuit euz on touez,
ha kaoud evelse unan da veza test ganeom euz e adsao da veo."

23. Setu e lakont daou war ar renk:

Jozef Barsabbaz, lesanvet Just, ha Mazeaz.

24. An diskibien a ra neuze ar bedenn-mañ:

"Aotrou Doue, c'hwi a anavez kalon an oll,

roit deom da houzoud pehini euz an daou-mañ ho peus dibabet

25 evid kemer ar garg a abostol e-neus Judaz dilezet evid mond

gand e blanedenn."

26. Tenna 'reont ar zord, ha koueza 'ra war Mazeaz,
hag hemañ, azaleg neuze, a gemer renk gand an unneg abostol.

SALM 102 / 1-2, 11-12, 19, 22

Diskan:	Ho kloar a ganom oll joaiuz	* Jezuz, savet beo leun a hloar,
.....	Da virviken, Salver Jezuz,	* A zeu da guitaad an douar:
	O troni en tu deou d'an Tad,	* Sevel a ra d'ar baradoz,
	Roue ha Mestr oh war beb tra.	* Eno emañ ouz or gortoz.

=== Ton kinniget: Ar Chapeled a hloar (Kantikou n° 70)

1. O va ene, kanom bennoz da Zoue;
euz a greiz va halon, meuleudi d'e ano santel.
2. Ya, va ene, kanom bennoz da Zoue,
heb dizonjal morse e vadoberou.
11. Kement ha m'eo savet an neñv a-uz d'an douar,
ker braz eo e vadelez evid ar re o deus doujans evitañ.
12. Ker pell ha m'emañ ar zav-heol ouz ar huz-heol,
ker pell diouzm e vez bannet gantañ or pehejou.
19. Emañ an Aotrou Doue o troni e barr an neñvou;
roue eo war gement tra a zo.
22. Meulit anezañ, c'hwi oll e grouadurien,
e kement leh ma'z eo mestr ha roue.

Eil Lennadenn.- Dre ar garantez, emañ Doue o chom e Doue,
..... ha Doue o chom ennom.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (4/11-16)

11. Va re muia karet, pegwir e-neus Doue or haret evelse,
ni, d'on tro, a dle kaoud karantez an eil evid egile.
12. Doue n'e-neus dén gwelet anezañ biskoaz.
Med, ma 'n em garom an eil egile, emañ Doue o chom ennom,
hag e garantez a zo ennom en he haerra.
13. Gand an dra-mañ ez om sur emañ o chom ennañ, hag eñ o chom ennom:
perz en e Spered e-neus roet deom.
14. Ha ni, p'on eus gwelet gand on daoulagad, ni a ro testeni
e-neus an Tad kaset e Vab da veza Salver ar bed.
15. Kement hini a ziskleir eo Jezuz Mab Doue,
emañ Doue o chom ennañ, hag eñ o chom e Doue.
16. Ha ni 'zo deut da anaoud ervad, dre ar feiz,
ar garantez e-neus Doue evidom.
Karantez eo Doue: an neb a zo o chom er garantez a zo o chom e Doue,
ha Doue a zo o chom ennañ.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! N'ho lezin ket emzivaded, eme Jezuz;
mond a ran kuit ha dond a ran en-dro d'ho kaoud,
hag ho pezo levenez leiz ho kalon.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (17/11-19)

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad,
e-neus Jezuz pedet evelhénn evid e ziskibien:

11. "Tad santel, mirit dre hoh ano-hwi ar re-mañ ho peus roet din,
evid ma vezint unan, evel ma 'z om-ni.
12. Keit ha m'on bet ganto, me eo a vire dre hoh ano
ar re ho peus roet din;
o diwallet am eus, ha n'eus eet nikun anezo da goll,
nemed paotr e zaonedigez, evid ma teufe da wir ar Skritur.
13. Med bremañ emeon o tond davedoh,
ha kement-mañ a lavaran p'emaon c'hoaz er bed,
evid m'o devo enno va levenez leun, ha leun-barr.
14. Grêt am eus dezo an donezon euz ho komz,
hag ar bed e-neus kemeret kaz outo,
ablamour ma n'int ket euz ar bed,
evel me kennebeud n'on ket euz ar bed.
15. N'eo ket o zenna euz ar bed a houlennan diganeoh,
med o diwall a-eneb an droug.
16. Euz ar bed n'int ket, evel me kennebeud n'on ket euz ar bed.
17. Grit ma vint gouestlet deoh dre ar wirionez;
gwirionez eo ho komz-c'hwi.
18. Evel m'ho peus kaset ahanon da zond er bed,
me, d'am zro, am eus o haset er bed.
19. Hag evito en em ouestlan deoh,
evid ma vint d'o zro gouestlet deoh e gwirionez.

OREZONOU AR ZEIZVED SULVEZ PASK

KEMPEDENN.-

Pedom Doue...

Selaouit or pedenn, Aotrou Doue:
 ni hag a gred emañ Jezuz Krist, Salver an dud,
 o veva en ho kichen e kreiz ho kloar,
 grit deom kompren emañ ivez o chom ganeom, evel m'e-neus lavaret,
 beteg an deiz diweza euz ar bed:
 Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. - R/. Amen.

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, war-eun-dro gand ar provou-mañ,
 digemer pedennou ho pugale:
 an overenn-mañ, a lidom anezi gand or brasa karantez,
 ra heñcho ahanom warzu gloar ar baradoz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA - Pedom Doue... (pe: Pedom oll a-unan...)

Ni ho ped d'or zelaou, Aotrou Doue:
 dre vertuz ar gomunion-mañ, grit deom kredi startoh ha gwelloc'h
 e teuo da wir menozioù ho karantez evid korv an Iliz a-béz,
 kenkoulz ha m'eo grêt dija evid an hini a zo penn d'ar horv-se,
 Jezuz Krist, or Zalver, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll.....

SUL AR PANTEKOST

Lennadenn Ia.- Klevom sant Lukaz o tisplega penaoz, hanter-
..... kant devez goude Pask, eo bet diskennet ar
Spered Santel war an ebestel.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (2/1-11)

1. Da geñver deiz ar Pantekost, edo an diskibien oll dastumet er memez leh.
2. A daol trumm ez euz deut euz an neñv
eun trouz par da hini eur barrad avel diroll,
hag e-neus leuniet en e bez an ti m'edont ennañ.
3. Gweled a reont teodou evel re dan, o vond disparti
hag o tiskenn war beb hini anezo.
4. Oll ez int karget a Spered Santel,
hag e stagont da gomz yézou estren,
hervez ma roe ar Spered Santel dezo da zistaga o lavar.
5. Hogen, d'an ampoent e oa o chom e kêr Jeruzalem
Juzevien, tud a relijion,
euz kement bro a zo dindan bolz an neñvou.
6. Pa 'z eo c'hoarvezet an trouz-se, ez eus diredet eun engroez vraz a dud,
hag e chomont sebezet, rag pep hini a glev anezo o komz en e yéz e-unan.
7. Eet er-mêz anezo o-unan ha bamet oll, e lavaront:
"An dud-mañ a gomz evelse, daoust ha n'int ket oll euz Bro-Halilê?
8. Penaoz eta o hlevom-ni, pep hini e yéz e gavel?
9. Parted, Meded, Elamiz, tud ar vro etre an diou ster, a vro Judê,
10. broiou Kappados, ar Pont, an Azi, bro Friji, bro Bamfili, bro Ejipt,
kornad bro Libi wardro Kiren, tud euz kêr Rom,
11. Juzevien koulz ha re bet payaned, Kreted hag Arabed,
o hleved a reom o tisplega en or yezou oberou kaer Doue."

SALM 103 / 1ab,24ac, 29bc-30, 31-33

Diskan: Aotrou Doue, lakit ho Spered da hweza,
..... evid nevez fas an douar.

1. O va ene, kanom bennoz da Zoue;
Aotrou, va Doue, na pegen braz oh-c'hwi!
24. Diniver eo hoh oberou, Aotrou Doue;
leun eo an douar gand kement ho peus krouet.
29. Lamit o alan diganto, setu emaint maro,
hag e kouezont e ludu.
30. Lakit da hweza hoh alan-c'hwi, hag e vo buez enno,
ha fas an douar a vo nevezet ganeoh.
31. Ra bado gloar an Aotrou Doue da viken;
Levenez da Zoue en e oberou!
33. Kana 'rin meuleudi da Zoue 'hed va buez;
salmou a ganin d'am Doue keit ha ma vevin.

Eil Lennadenn.- Ar Spered Santel a ra d'ar gristenien beza
..... eur horv hebkén.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT. (12/3-7,12-13)

3. Va breudeur, n'eus dén ebed gouest da lavared: "An Aotrou eo Jezuz",
nemed dre ar Spered Santel.
4. Liez seurd donezonou a ro Doue d'an dud fidel,
med ar memez Spered eo;
5. Liez karg disheñvel a zo ivez en Iliz, med ar memez Aotrou Krist eo;
6. ha liez seurd oberou, med ar memez Doue o labourad atao e peb dén.
7. Evid mad an oll e vez roet da bep hini e zonezon
da ziskouez labour ar Spered.

12. Da skouer, lakom ar horv, a zo anezañ eur horv hebkén;
kalz a izili (pe: memprou) e-neus koulskoude,
med an oll izili, kaer o deus beza niveruz,
n'eus anezo nemed eur horv.

Evelse ivez (emañ kont gand) an Aotrou Krist.

13. Rag en eur Spered hebkén om bet badezet
da veza, ni oll, eur horv hebkén,
koulz Juzevien ha poblou all, koulz sklavourien ha tud libr;
oll eo bet torret deom or zehed diwar ar Spered n'eus nemetañ.

GWERZ AR SPERED SANTEL - "Veni, Sancte Spiritus" (1)

- | | |
|---------------------------------------|------------------------------------|
| 1. Deut, Spered Santel, euz an neñv,* | 5. Sklerijenn gaer, deut da leunia |
| Skuillit warnom ho sklerijenn.* | Goueled kalon ho tud fidel.* |
| 2. Tad ar re baour, donezonour,* | 6. Heb ho sikour, n'eus dén ebéd |
| Sklerijenn ar halonou, deut!* | Hag a vefe pur a behed.* |
| 3. Frealzer dispar, mignon deom,* | 7. Gwalhit, dourit ha pareït |
| Levenez dous an e-ne-ou.* | Kement 'zo louz,ha sèh,ha klañv.* |
| 4. Distan er wréz, diskuiz er boan,* | 8. Plegit, hag eeunit ha tommit |
| Frealzidigez 'kreiz an doan.* | Kement 'zo reut, ha kamm ha yén.* |
| 9. D'ar re a lak ennoh o feiz, | 10. Santelez ha silvidigez, |
| Roit ho seiz donezon santel. | Gand al levenez da viken. |

Notenn.- An ton a hell beza hini "Gourhemennou Doue", pe hini ar Chapeled
a joa (Kantikou n° 68).
Troidigez al Leksional embannet gand "Barr-Heol" (n° 64) a zo kaer
ivez hag a ya war an ton gregorian.

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Deuit, Spered Santel! Kargit kalonou ho tud fidel
ha c'hwezit enno tan ho karantez. - Alleluia!

Nota. - Ar poz kenta euz ar hantik "Spered Santel, Spered a sklerijenn"
a dalvezo amañ kenkoulz pe welloh.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (20/19-23)

19. Da gefñver deiz Pask, diouz an abardaez noz,
an noriou prennet war al leh m'eo bodet an diskibien
gand aon rag ar Juzevien,
e teu Jezuz en o zouez, hag e lavar dezo: "Ar peoh ra vo ganeoh!"
20. Goude beza lavaret kement-se, e tiskouez dezo e zaouarn hag e gostez.
Laouen braz eo an diskibien o weled an Aotrou.
21. Jezuz a gomz outo a-nevez: "Ar peoh ra vo ganeoh!
Evel m'e-neus va Zad kaset ahanon,
me ho kas d'am zro."
22. Goude ar homzou-se, e c'hwez warno, en eur lavared:
"Resevit ar Spered Santel:
23. D'ar re ho po pardonet dezo o fehejou, e vezint pardonet,
ha d'ar re ho po o dalhet outo, e vezint dalhet."

*
* An Orezonou evid an overenn a zo war ar bajenn war-lerh;
* Prefas ar Pantekost, er haier-mañ, p. 43 euz "Pedennou
* ha Lidou an Overenn!"

OREZONOU GOUEL AR PANTEKOST

KEMPEDENN - Pedom Doue...

Aotrou Doue, dre vertuz ar mister a lidom d'ar Pantekost,
c'hwi a ro santelez d'hoh Iliz e peb bro dre ar bed;
 plijet ganeoh c'hoaz
skuilla donezonou ar Spered Santel war an douar a-béz,
ha labourad dalhmad (pe: atao) e kalonou ar gristenien
 kenkoulz ha m'ho peus grêt en amzer an Ebestel.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz.....

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, hervez ar bromesa grêt gand ho Mab,
ma teuo ar Spered Santel d'or sklerijenna muioh-mui
 war ar mister santel emaoñ o lida,
ha da zigeri or sperejou d'ar wirionez penn-da-benn.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. -

* Prefas ar Pantekost, p.43 *

GOUDE KOMUNIA - Pedom Doue... (pe: Pedom oll a-unan...)

Aotrou Doue, pegwir e tigorit d'hoh Ilizteñzor`ar madou euz an
 nêñv,
mirit enni ar hras ho peus skuillet warni en deiz-mañ:
ar Spered Santel resevet hirio da labourad ennom kreñvoh-kreñva,
ha magadur ar gomunion da dalvoud evid or zilvidigez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/ Amen.

GOUEL AN DREINDED SANTEL

Lennadenn Ia.- Koulz hag evid pobl Israel gwechall,
..... on Doue-ni eo an Doue n'eus nemetañ.

PENNAD EUZ LEVR AN ADLEZENN (pe: Deuteronom, 4/32-34, 39-40)

Lavared a ree Moizez da bobl Israel:

32. "Goulennit 'ta digand an amzer goz a zo bet en ho raog,
abaoe m'e-neus Doue krouet an dén war an douar:
euz eur penn d'egile d'an oabl, ha bez' ez eus bet biskoaz tra ken kaer,
ha béz' ez eus bet morse klevet seurd tra?
- 33 Ha bez' he deus pobl ebed klevet mouez Doue o komz euz a greiz an tan,
evel m'ho peus-c'hwi e glevet, ha n'oh ket maro?
34. Ha bez' e-neus soñjet doue ebed
dond da gemer evitañ eur bobl euz a douez eur bobl all,
a-dreuz taoliou-amprou, sinou ha burzudou,
kreñv e zorn ha nerzuz e vreh er stourmad,
gouest da skei taoliou spontuz,
evel m'e-neus grêt ho Toue evidoh, e Bro-Ejipt, dirag ho taoulagad?
39. Lakit kement-mañ don en ho spered, garanet en ho kalon:
An Aotrou eo a zo Doue, kenkoulz en neñv ha war an douar,
ha n'eus hini all ebed.
40. C'hwi a viro e lezennou hag e hourhemennou, a roan deoh hirio,
evid m'ho po, c'hwi hag ho pugale, eürusted ha buez hir
er vro ez a da rei deoh an Aotrou, ho Toue."

SALM 32 - E-leh an diskan: "Eüruz ar bobl dibabet gand Doue",
e heller kemer hini ar Salm 24, ton R. Abjean:

"Warzu ennoh e savan va ene; va oll fizians 'zo ennoh, va Doue."

SALM 32 / 4-5, 6,9, 18,22 - Diskan: Eüruz ar bobl dibabet gand Doue.

4. An Aotrou Doue 'zo didro e lavar,
e oll oberou a heller fizioud warno.
5. Kared a ra ar gwir hag ar justis,
gand madelez an Aotrou eo leun an douar.
6. Dre gomz an Aotrou eo bet grêt an neñvou,
gand ar hwez euz e henou armead ar stered.
9. Distaga 'ra e gomz, ha setu grêt;
gourhemenn a ra, ha setu krouet an traou.
18. Daoulagad an Aotrou a bar war an dud a zouj anezañ,
war ar re a lak o esperans en e vadelez.
22. Skuillit 'ta ho madelez warnom, Aotrou Doue,
pegwir ennoh e lakom on esperans.

Eil Lennadenn.- Doue an Tad a ra ahanom e
..... vugale dre ar Spered Santel.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM. (8/14-17)

14. Va breudeur, an oll dud a vez renet o buez gand Spered Doue,
ar re-ze a zo bugale da Zoue.
15. M'ho peus resevet ar Spered, n'eo ket evid ober ahanoh c'hoaz,
e-keñver Doue, servicherien o krena gand aon;
med resevet ho peus eur Spered hag a ra ahanoh
bugale digemeret e famill Doue,
ar Spered a lak ahanom da grial dezañ: "Abba! Tad!"
16. Ar Spered Santel e-unan a ro testeni d'or spered-ni
ez om bugale da Zoue.

17. Neuze 'ta, ma'z om e vugale, ez om ivez heritourien d'e vadou,
heritourien da Zoue, hogen ken-heritourien a-unan gand an Aotrou Krist,
pegwir a-unan gantañ on eus da houzañv or poaniou
evid mond ivez a-unan gantañ e gloar Doue.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Gloar d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Glan,
'Vel a oll-viskoaz, bremañ (ha) da viken.

(An ton: "Eüruz an hini", evid an Alleluia zokén.)

PENNAD EUZ NIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. (28/16-20)

16. En amzer-se, goude Pask, e oa eet an unneg diskibl da Vro-Halilê,
beteg ar menez merket dezo gand Jezuz.
Ouz e weled, e stouont dirazañ; koulskoude, lod a zo chomet amgred.
18. Tostaad a ra Jezuz outo, ha setu e gomzou:
"Roet eo bet din peb galloud en neñv ha war an douar.
19. It en hent, euz an oll vroadou grit diskibien din,
roit dezo ar vadiziant en ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel,
20. ha deskit dezo mired kement tra am eus gourhemennet deoh.
Ha setu emañ ganeoh 'hed an oll deizioù, (pe: bemdez)
beteg fin ar bed."

OREZONOU GOUEL AN DREINDED

KEMPEDENN - Pedom Doue...

Aotrou Doue, c'hwi ho peus kaset er bed
ho Mab karet hag ho Spered a zantelez,
evid sklerijenna an dud war mister ho puez:
grit deom eta, beb gwech pa zisklerion ar gwir feiz,
renta gloar d'an Dreinded santel
hag adori eun Doue hebkén oll-halloudeg.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo
ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll-viskoaz da virviken.-

WAR AR PROVOU -

Ho pet ar vadelez, Aotrou Doue, pa bedim bremaig hoh ano santel,
da skuill ho pennoz war provou an overenn-mañ,
ha d'on lakad reizi e stad da veza, ni ivez,
eur brovadenn kinniget deoh evid atao. (pe: da viken)
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA - Pedom Doue...

Aotrou Doue, grit ma vo ar gomunion-mañ
talvouduz deom evid mad ar horv hag an ene,
ha ma talhim mad d'or feiz en Dreinded santel,
eun Doue hebkén e tri ferson.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

GOUEL AR ZAKRAMANT - Eil Sul goude ar Pantekost -

Lennadenn Ia.- An emgleo kenta etre Doue hag e bobl
 siellet gand gwad ar zakrifisou.

PENNAD EUZ EIL LEVR MOIZEZ (24/3-8)

3. Diskennet diwar ar Menez Sinaï, Moizez a zeu da gaoud ar bobl
 hag a zispleg d'an dud, penn-da-benn,
 komzou ha gourhemennou Doue,
 hag ar bobl en he fêz n'he deus nemed eur vouez da respont:
 "Kement e-neus lavaret an Aotrou, ni hen heulio."
4. Moizez neuze a ya da lakad dre skrid komzou an Aotrou en o hed.
 Antronoz vintin, e ra sevel eun aoter e-harz ar menez,
 ha daouzeg mên laket sonn evid an daouzeg rummad euz pobl Israel.
5. Kas a ra goudeze paotred yaouank euz pobl Israel
 da ginnig sakrifisou peurlosket
 ha da laza tirvi bian evel sakrifisou a beoh en enor d'an Aotrou.
6. Moizez a gemer an hanter euz ar gwad da lakad e basinou,
 hag a skuill ar peurrest war an aoter.
7. Goudeze e kemer levr an Emgleo, da lenn dirag ar bobl;
 hag an dud da respont:
 "Kement e-neus lavaret an Aotrou a raim hag a heuilim."
8. Moizez a gemer ar gwad, a strink anezañ war ar bobl, hag a lavar:
 "Ar gwad-mañ 'zo hini an Emgleo e-neus grêt an Aotrou ganeoh,
 war bouez heulia an oll gomzou-se."

SALM 115 /12-13, 15-16bc, 17-18

Diskan: Kalirad ar zilvidigez a gemerin,
 ha va fedenn a gasin daved Doue.

12. Petra 'roin en distro da Zoue, evid an oll vad e-neus grêt din?
13. Kalirad ar zilvidigez a gemerin, ha va mouez a zavin da veuli ano Doue.
15. Tenn eo d'an Aotrou gweled e vignoned o vervel.
16. Aotrou, me 'zo servicher deoh, mab d'ho servicherez;
c'hwi ho peus torret va liammou.
17. Eur zakrifis-trugarekaad a ginnigin deoh,
en eur zevel va mouez da veuli ano Doue.
18. Ar provou bet gouestlet ganin a ginnigin d'an Aotrou,
dirag e bobl a-bez.

Eil Lennadenn.- En e zakrifis, Or Zalver a skuill e wad
..... evid or gwalhi hag evid siella an emgleo
nevez.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (9/11-15)

11. Jezuz Krist, pa'z eo deut war an douar evel Beleg-meur ar madou da zond,
e-neus treuzet eun templ kaerroh ha brasoh (eged hini al Lezenn goz),
eun templ ha n'eo ket diwar labour mab-dén,
n'eo ket eta euz ar bed-mañ;
12. ha n'eo ket o skuilla gwad al loened lazet e sakrifis,
med o skuilla e wad dezañ e-unan,
ez eo antreet eur wech evid atao e santual Doue,
prenet an dud gantañ da viken.
13. Ma'z eo awalh skuilla gwad loened lazet e sakrifis, pe ludu eur vuoh,
evid gwalhi an dud e stad louz hag o zantellaad en o horv,
14. pegement muioh eo gouest da ober gwad Or Zalver:
Eñ a zo bet, dre ar Spered Santel, en em ginniget divlamm da Zoue,
hag e wad a walho deom or houstiañs euz an oberou maro,
evid ma vezim e stad vad da zervicha an Doue beo.

15. Setu perag eo eñ e-neus savet an Emgleo nevez etre Doue hag an dud:
 pa 'z eo marvet evid dasprena ar pehejou grêt dindan an emgleo kenta,
 ar re o deus klevet galvadenn Doue
 a hell gounid ar madou prometet dezo da heritaj peurbaduz.

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Me eo ar bara beo, diskennet euz an neñv;
 Neb a zebr anezañ a vevo da viken.

(a hell mond war don Kantik ar baradoz)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (14/12-16, 22-26)

12. Da zeiz kenta ar gouel, e veze lazetañ an oan-pask,
 hag an diskibien a houlenn ouz Jezuz:
 "Da beleh e fell deoh ez afem da bourchas an traou,
 deoh da zebri ar Pask?"
13. Kas a ra daou euz e ziskibien, en eur lavared dezo:
 "It e kêr; erruoud a ray ganeoh eun dén o tougen eur podad dour.
14. Kerzit d'e heul, hag éñ ti 'leh ma antreo, lavarit d'ar perhenn:
 "Ar Mestr a houlenn diganeoh: E peleh emañ ar zal
 ma hellin enni debri ar Pask gand va diskibien?"
15. Diskouez a raio deoh eur zal war al laez (pe: er zolier),
 frank ha kempenn; eno, pourchasit peb tra evidom."
16. Setu eet an diskibien e kêr;
 kaoud a reont an traou evel m'e-neus lavaret Jezuz,
 ha pourchas (pe: prepari) a reont ar Pask.

22. Epad m'emañt o tebri, setu Jezuz o kemer bara:
o veza lavaret ar vennoz, e torr anezañ hag e ro d'e ziskibien,
en eur lavared: "Kemerit, va horv eo hemañ."
23. Kemer a ra ivez eur halirad gwin: o veza lavaret ar vennoz,
hen ro dezo, hag oll eh evont dioutañ.
24. Lavaret e-neus dezo: "Va gwad eo hemañ,
hini an emgleo nevez, skuillet evid e-leiz a dud.
25. E gwirionez, m'hen lavar deoh, n'evin mui euz ar frouez gwinienn-se,
beteg an deiz ma evin eur gwin nevez e rouantelez Doue."
26. Goude ar bedenn-drugarekaad, ez int eet er-mêz etrezeg Menez an Olived.

OREZONOU GOUEL AR ZAKRAMANT

KEMPEDENN - Pedom Doue...

En ho sakramant euz an aoter, Salver Jezuz,
ho peus lezet ganeom ar zonzj euz ho Pasion;
grit deom, ni ho ped, kaoud evid mister santel ho Korv hag ho Kwad
doujans ha karantez awalh evid kaoud perz bepred
er frouez euz ho silvidigez:
C'hwi on Doue beo gand an Tad hag ar Spered Glan, a oll viskoaz...

WAR AR PROVOU - Plijet ganeoh, Aotrou Doue, rei d'hoh Iliz
donezonou kaer an unaniez hag ar peoh,
a welom ar zin anezo er provou kinniget en overenn.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. (* Ar Prefas: er Haier-mañ n° VI,
("Pedennou ha Lidou an Ov., p. 44.)

GOUDE KOMUNIA - Pedom oll a-unan...

Grit deom, Salver Jezuz, chom unanet ganeoh hag ho kaoud da viken,
 en eürusted on eus an tañva anezi er bed-mañ
 o reseo ho korv hag ho kwad santel:

C'hwi on Doue beo gand an Tad hag ar Spered Glan, a oll viskoaz da...

 =====

GOUEL AR GALON ZAKR / (Trede Sul goude ar Pantekost)

Lennadenn Ia.- Profeted al Lezenn goz a gomz dija euz karantez
 tener an Aotrou Doue evid e bobl.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED OZEA. (11/1, 3-4, 8c-9)

1. Pa oa Israel bugel c'hoaz, am eus bet karantez evitañ,
 galvet am eus va mab evid e denna euz Bro-Ejipt.
3. Me am eus desket dezañ bale, oh astenn va divreh d'e harpa,
 med eñ ne gompren ket am oa preder outañ.
4. 'Hed an hent e sachen anezañ da zond ganin,
 gand liammou tener, liammou a garantez.
 Bez' e vezen gantañ evel ar re a zibrad o hrouadurig en o divreh,
 sko ouz o jod; stoui a reen beteg ennañ da rei dezañ da zebri.
- 5b Israel, siouaz! ne felle ket dezañ distrei d'am haoud;
- 7a techet eo da dehoud diouzin;
8. Daoust hag e lezel a rin da vond da goll?
 Ne rin ket! Va halon em hreiz a dro tu evid tu,
 hag an druez a grign ahanon.
9. Ne lezin ket va hounnar da ziroll; ne zistrujin mui pobl Israel,
 rag Doue on, ha n'eo ket dén.
 En ho touez ez on an Doue santel, ha ne blij ket din distruja.

+++++

SALM, euz Levr Izaiaz (12/2-3, 4bcd,5-6)

Diskan: C'hwi 'zeuio laouen da gerhad dour

..... da vammennou (pe: feunteuniou) ar zilvidigez.

2. Doue a zigas din ar zilvidigez; fizians am eus, aon n'am eus ket.
3. Va nerz ha va gloar eo an Aotrou; digantañ am eus bet ar zilvidigez.
4. Meulit an Aotrou Doue, savit ho mouez d'e bedi,
embannit etouez ar poblou e oberou kaer,
dalhit sonj pegen uhel eo e ano.
5. Kanit en enor d'an Aotrou, rag traou dispar e-neus grêt;
dre an douar a-bez brudit e oberou;
Lammit gand al levenez, tud kêr Zion, ha kanit meuleudi,
rag emañ en ho touez an Doue braz ha santel.

Eil Lennadenn.- Sant Paol a zo evel o virvi, pa gomz
..... euz karantez Or Zalver, an Aotrou Krist.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (3/8-12,14-19)

8. Va breudeur, me, an disterra euz an dud fidel,
a zo bet roet din gras ha karg da brezeg etouez ar bayaned
ar pinvidigeziou dreist-muzul a zo en Aotrou Krist,
9. ha da daoler sklerijenn war ar menoz misteriu a zo a-viskoaz,
med kuzet beteg-hénn, e spered Doue, krouer an oll draou.
10. Evelse, an Elez o-unan hag oll sperejou an neñvou
a zo deut bremañ da houzoud, o weled an Iliz,
pegen liez doare a zo da furnez Doue.
11. A viskoaz etnoa Doue divizet ober kement-se,
ha digaset e-neus e venoz da wir en Or Zalver Jezuz Krist.
12. A drugarez d'ar Zalver ha dre or feiz ennañ,
ez om hardiz awalh evid tostaad ouz Doue gand fizians.

14. Setu perag e plegan va daoulin dirag an Tad,
15. an hini a denn anezañ e ano peb lignez en neñv ha war an douar.
16. Plijet gantañ rei deoh diwar grasou puill e hloar,
ma vo kreñveet ennoh, dre e Spered Santel,
an nerz a laka da greski an dén renevezet;
17. Ra vo an Aotrou Krist o veva, dre ar feiz, e diabarz ho kalonou,
deoh da gaoud er garantez gwriziou ha diazevou stard.
18. Gouest e viot evelse, gand an oll dud fidel, da intent
pegen ledan, pegen hir, pegen uhel ha pegen don eo,
ya, da anaoud ervad karantez an Aotrou Krist,
a zo en tu all da beb anaoudegez.
19. Hag e viot karget leun barr gand Doue hag e vuez peurvad.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia! Goude beza karet e ziskibien a oa er bed,
Jezuz a zo eet gand e garantez beteg penn.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (19/31-37)

- En amzer-se, da wener ar groaz,
31. o veza ma oa derhent ar zabbad,
evid na jomfe ket ar horvou ouz ar groaz da zeiz ar zabbad,
rag eur gouel braz e oa ar zabbad-se,
ar Juzevien o deus goulennet digand Pilat ober terri dezo o divesker
ha lemel kuit o horvou.
 32. Dond a ra ar zoudarded eta, ha terri a reont e zivesker d'an hini kenta,
ha goudeze d'an eil a oa bet staget ouz ar groaz e kichen Jezuz.
 33. Med, p'en em gavont gand Jezuz ha pa welont ez eo maro,
ne dorront ket dezañ e zivesker.

34. Unan avad euz ar zoudarded, gand eun taol lañs (pe: goaf)
a zigor dezañ e gostez, ha kerkent e red gwad ha dour dioutañ.
35. An hini e-neus gwelet a ro testeni a gement-se, ha gwir eo e desteni.
Hag hennez a oar e lavar ar wirionez,
evid m'ho pezo feiz, c'hwi ivez.
36. Rag c'hoarvezet eo an traou-mañ evid seveni ar Skritur:
"Askorn ebed ne dorrot dezañ."
37. Hag eur Skritur all a lavar c'hoaz:
"Selled a raint ouz an hini o deus toullet dezañ e gorv."

OREZONOU EVID OVERENN AR GALON ZAKR

KEMPEDENN - Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg, p'emaom oh enori Kalon Zakr ho Mab karet
en eur vaga ennom ar zonzj euz merkou brasa e garantez evidom,
grit ma kavim enno bepred eur vammenn a joa hag a hrasou.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh.....

WAR AR PROVOU - Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
selled ouz karantez dreist-muzul Kalon ho Mab karet,
evid ma hello ar zakrifis a ginnigom plijoud deoh
ha rei deoh an digoll euz or pehejou.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

*** Eur Prefas nevez a zo kinniget er bajenn war-lerh, ouspenn an hini
..... a zo e "Pedennou ha Lidou an Overenn" p. 44.

GOUDE KOMUNIA - Peñom oll a-unan...

Dre ar zakramant-mañ euz ho karantez, Salver Jezuz,
 ho pedom da domma or halonou gand tan ho Kalon Zakr,
 evid ma vim gouest, hervez ho kourhemenn,
 da gared or breudeur evel m'ho peus-c'hwi or haret.
 C'hwi on Doue beo gand an Tad hag ar Spered Glan, a oll viskoaz da...

PREFAS AR GALON ZAKR (diwar an diweza Levr-Overenn galleg, 1970)

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, or Zalver.
 Douget gand e garantez virvidig, e-neus, war ar groaz,
 en em ginniget e sakrifik evidom;
 ha dre an toull en e gostez, gwad ha dour o tivéra dioutañ,
 e-neus roet buez da zakramanchou an Iliz,
 evid ma vo an oll dud sachet daved e Galon Zakr,
 ha ma teuint laouen da derri o zehed
 da feunteuniou beo ar zilvidigez.
 Drezañ eo, Tad santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
 a 'fell deom unani ganto or moueziou, en eur lavared a greiz kalon:

K A I E R O U

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G
.....

=====

K A I E R N° 7

Miz Mezeven 1970
.....

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages : 10 F.

C?C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper)

TAOLENN AR HAIER n° VII - Miz Mezeven 1970

SKRITUR ZAKR HAG OREZONOU

X ved SUL Ordinal		P. 1-5
XI ved - -		6-8
XII ved - -		9-11
Testenn latin Orezonou ar zuliou X, XI ha XII		12
Derhent Gouel an Ebestel Per ha Paol		13-16
Gouel an Ebestel Per ha Paol		17-20
XIII ved SUL ordinal		21-25
XIV ved - -	. (5.a.viz.Gouere).	26-28
XV ved - -		29-32
XVI ved - -		33-36
Sant z Anne		37

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 29 a viz mae evid al lodenn 1a,
ha d'an 12 a viz mezeven.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

/-xved SUL ORDINAL / (3e Sul goude ar Pantekost)

Lennadenn Ia.- Doue a daol e valloz war an diaoul, tad ar
..... pehed, hag a lavar dezañ e vo trehet.

PENNAD EUZ LEVR PENN KENTA AR BED (3/9-15)

Goude m'e-noa Adam dizentet ouz Doue,

9. an Aotrou Doue a halvas anezañ d'e gaoud: "E peleh emañ?"
10. Hag an dén da respont: "Klevet am eus trouz ho pale el liorz,
hag am eus bet aon, o veza m'emaon e noaz, hag on eet da guzad."
11. Doue adarre: "Piou 'ta e-neus roet dit da anaoud emañ e noaz,
nemed ha debret az pefe euz ar wezenn am moa divennet ouzit?"
12. An dén a respontas: "Ar vaouez ho peus lakat din em hichen,
hi he deus roet din euz frouez ar wezenn, hag am eus debret."
13. An Aotrou Doue a lavaras d'ar vaouez: "Petra ho peus grêt?"
hag e respontas ar vaouez: "An naer e-neus touellet ahanon,
hag am eus debret."
14. Hag e lavaras an Aotrou Doue d'an naer:
"Ablamour m'az peus grêt kement-se, e vezi milliget
e-touez an oll anevaled hag e-touez oll loened ar mêziou;
en em stleja 'ri war da gov, ha douar a lonki a-hed da vuez.
15. Enebiez a lakin etrezoud hag ar vaouez, etre da lignez hag he lignez;
he lignez a 'flastro dit da benn, ha te a dago anezi en he zeul."

SALM 129 / 1-2, 3-4ab, 7-8

Diskan: Gand an Aotrou Doue emañ an drugarez,
..... Digantañ heb muzul e teu silvidigez.

pe: Fizians am eus ennoh, daoust ha ma'z on peher;
.... Selaouit va 'fedenn, Jezuz, c'hwi 'zo Salver. (S.7,R.Abjean)

1. Euz goueled an toull don, e krian warzu ennoh, Aotrou Doue:
2. Aotrou, selaouit ouz va mouez.
Ra vo digor ho tiskouarn da gleved va 'fedenn.
3. Ma talhit kont piz euz ar pehejou, Aotrou Doue,
piou a hello herzel?
4. Med ganeoh emañ ar pardon, evid ma viot enoret.
- 4c-5. Fizians am eus en Aotrou Doue; fizioud a ra va ene war e hér.
6. Gortoz a ra va ene an Aotrou Doue,
surroh eged ar gedour-noz o hedal goulou-deiz.
7. Ra lako Israel e fizians en Aotrou Doue;
rag gand an Aotrou emañ an drugarez,
digantañ heb muzul e teu silvidigez.
8. Hag eñ a ziskargo Israel euz pouez e oll behejou.

Eil Lennadenn.- Ar hristen dirag ar maro a zo e zonz
..... er vuez da zond.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (4/13-5/1)

13. Va breudeur, spered ar feiz on eus, hervez m'eo merket er Skritur:
"Kredet am eus, rag-se am eus komzet."
Ni ivez on eus ar feiz, rag-se e komzom.
14. Rag, her gouzoud a reom ervad,
an hini e-neus adsavet an Aotrou Jezuz da veo
on adsavo, ni ivez, a-unan gand Jezuz hag on lakaio ganeoh en e gichen.
15. Kement a reom a zo ablamour deoh,
evid ma teuio grasou puill, da greski bepred, evid gloar Doue,
an anaoudegez vad e kalonou eun niver brasoh a dud.
16. Setu perag ne fallgalonom ket;
ha, daoust ma 'z a da 'fall ennom an den diavêz,
e talh an den diabarz ahanom da nevesaad euz an eil deiz d'egile.
17. Ya, on trubuillou er bed-mañ, skañv da zougen ha treménuz,
a bourchas evidom eun digoll peurbaduz a hloar dreist-muzul.
18. Setu perag n'eo ket war an traou a weler eo paret or zellou,
med war an traou na weler ket;
ar re a weler n'int ket da badoud, med ar re na weler ket a zo peurbaduz.
- 5,1. Her gouzoud a reom, ma teu on demeurans war an douar da veza diskaret,
on eus en neñvou eun ti savet gand Doue, ha n'eo ket diwar zorn an dén,
eun demeurañs peurbaduz.

SALUD D'AN AVIEL- Unan euz ar re ordinal.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (3/20/35)

20. En amzer-se, e teuas Jezuz d'ar gêr, hag adarre eun engroez tud war e dro,
ken n'hellent ket zokén debri o boued.
21. Pa glevas e dud kement-se, e teujont evid e zamma ganto,
rag lavared a reent: "Kollet eo e benn gantañ."

22. Ar skribed, diskennet euz Jeruzalem, a lavare ivez:
"Beelzeboul a zo ennañ; dre vestr braz an droug-sperejou eo
eh argas kuit an droug-sperejou."
23. Jezuz o galvas d'e gaoud, hag a lavaras dezo dre barabolenn:
"Penaos e hell Satan argas Satan?"
24. Eur rouantelez hag a zo enebiez enni n'hell ket padoud;
25. eun ti hag a zo dizunanet outañ e-unan n'hell ket chom en e zav.
26. Neuze, mar deo en em zavet Satan eneb dezañ e-unan,
ha ma 'z eo dizunanet outañ e-unan,
n'eo ket evid padoud: echu eo gantañ.
27. Ne hell nikun mond tre e ti eun den kreñv, ha laerez e vadou,
nemed ha liammet e-nefe da genta an den kreñv-se;
neuze hebkén e hell skrapa e draou.
28. E gwirionez, m'henn lavar deoh, an dud a vo pardonet dezo
an oll behejou hag an oll gomzou dizakr bet lavaret ganto;
29. Med piou bennag e-no komzet dizakr a eneb ar Spered Santel,
hennez ne vo biken pardon ebed evitañ:
kabluz a behed eo evid atao."
30. Evelse e komze Jezuz, ablamour m'o doa lavaret:
"Eur spered hudur a zo ennañ."
31. Neuze e tigouezas e vamm hag e vreudeur.
Chomet er-mêz euz an ti, e lakjont e houlenn.
32. Kalz tud a oa azezet en-dro dezañ, pa voe lavaret dezañ:
"Setu da vamm, da vreudeur ha da hoarezed a zo er mêz ouz da glask."
33. Hag eñ ha respont dezo: "Piou eo va mamm, ha piou va breudeur?"
34. Hag, o teurel e zellou war an dud azezet tro-dro dezañ, e lavaras:
- 35 "Setu va mamm ha va breudeur.
An neb a ra bolontez Doue,
hennez a zo breur din, ha c'hoar ha mamm."

OREZONOU AN Xved SUL ORDINAL

KEMPEDENN - Pedom Doue...

Aotrou Doue, diganeoh eo e teu kement mad a zo,
ha setu ar hras a houlennom digand ho largentez:
lakit da zevel ennom ar zonz hag ar hoant euz ar pezh 'zo mad da ober,
hag heñchit ahanom evid kas da benn ar zonzou santel-se.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU -

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, taoler ho sellou
warnon ha war an overenn emañ o lida 'vid ho servij:
ma vo or provadenn digemeret mad ganeoh,
ha ma talvezo deom en distro ho skoazell en or zempladurez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

GOUDE KOMUNIA - Pedom Doue... (pe: Pedom oll a-unan)

Aotrou Doue, evel eur medisin mad e tigasit deom ar pare
dre ar zakrifis santel hag ar gomunion:
grit eta ma vim dieübet (pe: diahubet) euz on techou fall
ha douget da ober bepred ar pezh 'zo mad.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Nota. - El levr-overenn koz, ar gempedenn a oa d'ar Ved Sul goude Pask,
war ar provou d'an XIved goude Pantekost, ha goude komunia d'ar
VIIved goude Pantekost.

Lennadenn Ia.- Klevom gand ar profed penaoz e vo rouantelez
..... Doue: par d'ar wezenn-sedr, ar Zalver da zond
hag e rouantelez a holoio an douar.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL (17/22-24)

22. Setu amañ komzou an Aotrou Doue:

"Mond a ran-me da gemer, diwar beg ar wezenn-sedr,
eur skourr tener euz ar re uhella,
hag e plantin anezañ war lein eur menez uhel e gern.

23. War eur menez uhel euz Bro-Israel e plantin anezañ:

taoler a raio kreskennoù ha dougen frouez,
hag e savo da wezenn-sedr euz ar re gaerra.
Dond a ray an oll laboused da jom enni,
re a beb seurd da neiza e skeud he skourrou.

24. Ha gwez ar mêziou a ouezo oll ez eo me, an Aotrou,
a ziskar ar wezenn uhel hag a uhella ar wezenn izel,
a laka da zizehi ar wezenn hlaz, ha da hlaza en-dro ar wezenn zèh.
Me, an Aotrou, am eus lavaret, hag hen ober a rin."

SALM 91 /2-3, 13-14, 15-16. Diskan: Eun dra vad eo meuli Doue!

2. Eun dra gaer eo meuli an Aotrou Doue,
sevel soniou deoh, Mestr uhel-meurbed.

3. Embann ho madelez kerkent ha goulou-deiz,
hag ho fealded d ho kër penn-da-benn an noz.

13. An dén just, par d'ar gwez-palmez, a vleunio;
 'Vel gwez-sedr Menez-Liban e kresko.
14. E ti an Aotrou p'o do grêt gwriziou,
 e leuriou ti Doue e taolint o bleuñ.
15. Beteg en o hozni e tougint frouez,
 druz e chomint ha glaz o deliou;
16. Dezo da embann eo just an Aotrou:
 Eñ va roh divrall, ne ra gaou morse.

Eil Lennadenn.- Or brasa preder, koulz er vuez, koulz er maro,
..... eo plijoud da Zoue.

PENNAD EUZ EIL LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (5/6-10)

6. Dineh-kaer e chomom bepred (pe: Stard or halon e chomom bepred),
 ha pa ouzom penaoz, keit ha m'emaom o veva en or horv,
 emaom en harlu, pell diouz ti an Aotrou Doue;
7. rag dre ar feiz e kerzom (warzu ennañ, n'eo ket dre ar gweled anezañ.
8. Ya, sur, dineh-kaer ez om, ha kalz gwelloh e kavom
 diloja euz ar horv-mañ ha mond da veva e ti Doue.
9. Or brasa preder eo plijoud dezañ, koulz er gêr pe pell diouz ar gêr.
10. Rag oll e rankim en em ziskouez evel m'emaom,
 evid beza barnet gand Or Zalver,
 ha reseo pep hini ar pez e-no gounezet o veva en e gorv, mad pe 'fall.

SALUD D'AN AVIEL.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (4/26-34)

26. En amzer-se, edo Jezuz o lavared d'ar bobl:
 "Gand rouantelez Doue emañ kont
 evel gand eun dén taolet gantañ had en douar.

27. Ha pa vez kousket pe zihun, én noz pe én deiz,
e tiwan hag e kresk an had heb gouzoud dezañ.
28. Anezañ e-unan e taol an douar e frouez, da genta ar yeotenn,
goudeze ar penn-éd, goudeze leun a hreun ar penn.
29. Ha pezh dare an éd, dioustu e vez medet,
o veza ma vez deuet mare an eost.
30. Lavared a ree c'hoaz: "Ouz petra eo heñvel rouantelez Doue?
E keñver petra e lakim anezi?
31. Heñvel eo ouz eur hreunenn zezo:
pa vez taolet en douar, ez eus anezi ar bianna euz an oll hajou 'zo er bed;
ha pa vez bet hadet, e sav hag e teu da veza brasoh eged
an oll blantennou all, hag e taol skourrou braz,
kén ma hell laboused an neñv kaoud ar goudor dindan e skeud."
33. Ha gand seurd parabolennou a-leiz, e roe d'an dud e gelennadurez,
e kement ha ma oant gouest da intent.
34. Ne gomze outo nemed dre barabolennou; med pa veze gand e ziskibien
en o fart o-unan, e tisplege dezo peb tra.

OREZONOU AN XIved SUL

KEMPEDENN. - Aotrou Doue, mammenn a nerz d'ar re a esper ennoh, selaouit or
pedennou gand madelez: * pa ouzoh ne hell mab-dén ober netra hebdoh,
roit deom sikour ho kras evid heulia ho kourhemennou, ha plijoud
deoh a galon ha dre on oberou. Dre Or Zalver

WAR AR PROVOU - Aotrou Doue, gand ar provou 'zo amañ, bara ha gwin,
e roit d'an dud, ouspenn o magadurez er vuez-mañ, danvez ar zakramant
a vag enno ar vuez nevez: * plijet ganeoh ma n'o do morse diouer
nag evid o horv han evid o ene. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

GOUDE KOMUNIA. - Salver Jezuz, evel ma'z eo ar gomunion resevet ganeom
eur zin da verka unaniez ar gristenien ennoh, * grit ma lako ivez
en hoh Iliz unaniez stard ha gwirion. C'hwil on Doue beo a oll-v...

Ia Lennadenn.- Ar pennad-mañ, koulz hag ar Salm war-lerh
 hag an Aviel, a ziskouez Doue mestr war ar mor

PENNAD EUZ LEVR JOB (38/8-11)

1. Euz 'a greiz ar gorventenn e lavaras an Aotrou Doue da Job:
8. "Piou 'ta e-neus stañket ouz ar mor gand doriou doubl,
 p'edo o tarza nevez-ganet euz kov an douar?
9. hag e rois dezañ ar goabrenn da wiskamant,
 hag ar houmoul da vaillurou.
10. Goudeze, am eus merket dezañ e harzou,
 ha laket warnañ doriou ha moraillou,
11. hag am eus lavaret: "Beteg amañ e teui, ha ne di ket pelloh!
 Amañ e torri da houlennoù c'hwezet gand eonenn."

SALM 106 / 23-24,25-28,29-31 -

Diskan: Kanit meuleudi d'an Aotrou Doue,
 rag e vadelez a bado da viken.

23. An dud a ya war o listri er mor, d'ober konverz a-dreuz an donvor,
24. ar re-ze o deus bet tro da weled oberou an Aotrou Doue
 hag e vuzudou e-kreiz an toullou don.
25. Eur gomz gantañ, ha setu ar gorventenn o hweza diroll,
 hag houlennoù(pe: tarzou) ar mor o sevel.
26. An dud, tro ha tro savet da douch an oabl ha diskennet en toull don,
 a yee bian o halon e-kreiz ar poaniou.
28. Savet o deus o mouez warzu an Aotrou euz a greiz o anken,
 hag eñ e-neus o zennet a boan.

29. Laket e-neus an avel da drei en eun êzenn flour,
hag an houlennoù d'ober peoh.

31. Meulit oll an Aotrou evid e vadelez,
evid ar burzudou a ra e keñver an dud.

Eil Lennadenn.- Bez' e heller taoler evez ouz ar frazenn
..... genta hag an hini ziweza.

PENNAD EUZ EIL LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (5/14-17)

14. Va breudeur, karantez Or Zalver ne lez diskuiz ebed ganeom,
pa zoñjom en dra-mañ: ma'z eo bet marvet unan evid an oll,
an oll eta a zo tremenet dre ar maro;

15. hag ouspenn-ze, marvet eo ar Zalver evid an oll,
evid ma teuio ar re 'zo beo da veva, n'eo ket evito o-unan,
med evid an hini 'zo bet evito maro hag adsavet da veo.

16. Evelse, ni, diwar vremañ n'on eus mui anaoudegez euz dén ebed
hervez doareoù ar bed;
ha pa vefe bet anavezet ar Zalver ganeom hervez doareoù ar bed,
bremañ avad ne reom kén.

17. Evelse ive, kement hini a zo en Aotrou Krist
a zo grêt anezañ eun dén nevez;
ar bed koz a zo eet e-bêoù, setu ganet eur bed nevez.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia! Bennoz a-berz Doue
d'ar Zalver 'zo o tond, or Roue!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (4/35-41)

35. En deiz-se, deut ar pardaez-noz, Jezuz a lavar d'e ziskibien:
"Treizom da vond en tu all."
36. Goude beza tehet diouz ar bobl, e kemeront anezañ evel m'edo da vond
ganto er vag; ha bez' e oa bagou all d'e heul.
37. Eur barrad avel diroll a zav;
an tarzou a lamme er vag, beteg he hargha.
38. Edo Jezuz e penn adrefn ar vag, kousket war an dorchenn;
mond a reont d'e zihuni, en eur lavared dezañ:
"Mestr, ha n'oh ket chalet ganeom,
p'emaom o vond da goll?"
39. Eur wech dihunet, e ra gourdrour d'an avel,
hag e lavar d'ar mor: "Chom sioul! Ro peoh!"
Ha setu torret war an avel, ha peoh kaer o rén.
40. Lavared a ra Jezuz dezo: "Perag oh spontig evelse?
Penaoz n'ho peus ket a feiz?"
41. Kroget aon braz enno, e lavaront an eil d'egile:
"Piou 'ta eo hemañ, pa zent outañ koulz an avel hag ar mor?"

OREZONOU an XIIved SUL *****

KEMPEDENN.- Grit deom, Aotrou Doue, kaoud bepred doujans ha karantez evidoh,*
pegwir n'ehanit morse da heñcha en o buez
an dud a stagit ouzoh gand liamm stard ho karantez. Dre Or Zalver...

WAR AR PROVOU- Plijet ganeoh, Doue a drugarez, ober deom digemer vad,*
pa zeuom a wir galon da ginnig deoh ar zakrifis a beoh hag a veuleudi.

GOUDE KOMUNIA - Goude beza kinniget deoh e sakrifis Korv ha Gwad Or Zalver
ha beza e resevet, e teuom d'ho pedi c'hoaz, Aotrou Doue:*
saveteet da viken, ra gavim da vad, en eürusted ar baradoz, ar madou
n'on eus anezo nemed an tañva dre ar feiz. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

TESTENN LATIN an Orezonou evid ar Suliou X-XI-XII

- SUL X - a/ Deus, a quo bona cuncta procedunt, largire supplicibus tuis: ut cogitemus, te inspirante, quae recta sunt, et te gubernante, eadem faciamus.
- b/ Respice, Domine, quaesumus, nostram propitius servitutem: ut quod offerimus sit tibi munus acceptum, et sit nostrae fragilitatis subsidium.
- c/ Tua nos, Domine, medicinalis operatio, et a nostris perversitatibus clementer expediat, et ad ea quae sunt recta perducatur.
- SUL XI. a/ Deus, in te sperantium fortitudo, adesto propitius invocationibus nostris: et quia sine te nihil potest mortalis infirmitas, praesta auxilium gratiae tuae; ut in exsequendis mandatis tuis, et voluntate tibi et actione placeamus. (Ia post Pentec.)
- b/ Deus, qui humani generis substantiam, praesentium munerum et alimento vegetas, et renovas sacramentis: tribue, quaesumus, ut eorum et corporibus nostris subsidium non desit, et mentibus. (Votiva contra famem).
- c/ Haec tua, Domine, sumpta sacra communio, sicut fidelium in te unionem praesignat, sic in tua Ecclesia unitatis, quaesumus, operetur effectum. (Vot. pro unitate Eccl.)
- SUL XII-a/ Sancti nominis tui, Domine, timorem pariter et amorem fac nos habere perpetuum: quia nunquam tua gubernatione destituis, quos quos in soliditate tuae dilectionis instituis. (2a Pent.)
- b/ Annue, misericors Deus, ut hostias placationis et laudis sincero tibi deferamus obsequio. (Fer. IV Pass.)
- c/ Perficiant in nobis, quaesumus, Domine, tua sacramenta quod continent: ut quae nunc specie gerimus, rerum veritate capiamus. (IV T. Sept.)
- *** Evid ar bedenn-mañ n'on eus ket kavet tostoh e latin,

SKRITUR ZAKR EN OVERENN - Kaier n° VII

DERHENT GOUEL PER

Lennadenn Ia.- An dén kamm pareet gand sant Per.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (3/1-10).

1. Eun deiz, da deir eur goude kreisteiz, eur ar bedenn,
edo Per ha Yann o pignad d'an Templ e Jeruzalem.
2. Ha dres (pe: ha setu) edod o tougen beteg eno eun den kamm,
sonnet e zivesker abaoe ma oa anezañ, hag a veze digaset bemdez
e kichen eun nor euz an Templ anvet an Nor Gaer,
da houlenn aluzen digand an dud a veze o vond en Templ.
3. An den-se a wel Per ha Yann war-nez antreal en Templ
hag a stag d'o fedi evid kaoud eun aluzen diganto.
4. Per a zalh e zaoulagad parèt warnañ, ha Yann kenkoulz all;
lavared a ra dezañ: "Sell mad ouzom."
5. Egile a jom digor braz e zaoulagad da zelloud outo,
o hortoz kaoud eun dra bennag diganto.
6. Per a lavar dezañ: "N'am eus nag arhant nag aour,
med ar pezh am eus a roan dit:
a-berz ar Zalver Jezuz, euz Nazared, sav ha bale."
7. Tapoud a ra peg (pe: krog) en e zorn deou evid e zevel,
ha kerkent eo startet e zivesker, beteg seuliou e dreid.
8. En eul lamm emañ en e zav hag en em lak da vale; antreal a ra ganto
en Templ, dalhmad o vond hag o tond, o fringal hag o veuli Doue.
9. An oll dud a oa eno o deus e welet o vale hag o veuli Doue.
10. E anaoud a reont evid beza an hini a veze o houlenn aluzen
e kichen an Nor Gaer euz an Templ; sebezet krenn e oant,
ha n'hellent ket kompren petra oa c'hoarvezet gantañ.

SALM 18 / 2-3, 4-5 - Diskan: Dre ar bed oll, e red
..... Ar zon euz o moueziou.

2. An neñvou a zispleg gloar an Aotrou Doue,
hag an oabl a ziskouez labouriou e zaouarn.
3. An deiz d'an deiz (war-lerh) a gas ar helou,
an noz d'an noz a lavar ar gentel.
4. N'eus ket aze na prezeg (pe: langaj), na komzou a jomfe digompren;
5. Dre an douar a-bez eo bet klevet ar zon euz o moueziou,
ha beteg pennou pella ar bed eo eet o homzou.

Eil Lennadenn. - Sant Paol a zispleg e-unan penaoz eo deuet
da veza abostol Jezuz Krist.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN BRO-HALL-AZIA (1/11-20)

11. Va breudeur, hen diskleria 'ran deoh,
an Aviel ez on bet o prezeg deoh .
n'eo ket un dra bet ijinnet gand dén pe zén,
12. ha me kennebeud, n'eo ket digand eun dén am eus bet anezañ hag
am eus e zesket,
med digand Jezuz Krist deuet d'en em ziskouez din.
13. Klevet ho peus lavared penaoz e heulien gwechall relijion ar Juzevien,
pegen dirollet e oan da ober droug da Iliz Doue ha d'he diskar.
14. Juzeo penn-kil-ha-troad e oan, ha trèh e oan war ar poent-se
d'ar peb muia euz tud va gouenn én oad ganin,
o veza startoh divennour da gelennadurez va zadou.
15. Med Doue e-noa va laket a-gostez, araog ma oan ganet,
ha va galvet e-neus dre hras e vadelez,

16. ha dond a reas an eur ma plijas gantañ diskouez din e Vab,
evid ma'z afen da embann ar helou mad anezañ d'ar poblou payan.
17. Dioustu neuze, heb kemer kuzul digand dén,
heb pignad zokén da Jeruzalem da gaoud ar re a oa ebestel em raog,
ez on eet da Vro-Arabi, ha goudeze on distroet da Zamaz en-dro.
18. Tri bloaz diwezatch, ez on pignet da Jeruzalem,
evid ober anaoudegez gand Pèr, hag ez on chomet pemzetez gantañ.
19. Hini all ebed euz an Ebestel n'am eus gwelet,
nemed Jakez, an hini 'oa kar d'ar Zalver.
20. Ar pezh a skrivin deoh aze, m'hen asur dirag Doue,
n'eo ket gaou a lavaran.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia! Salver Jezuz, c'hwi 'anavez peb tra:
C'hwi 'oar mad va harantez evidoh. Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (21/15-19)

Jezuz, savet da veo euz ar bez, a zo deut d'en em ziskouez d'an Ebestel
war vord lenn Jenezared.

15. Goude o lein, e lavar Jezuz da Zimon Per:
"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon muih eged ar re-mañ?"
Respont a ra: "Ya, Aotrou, gouzoud a rit am eus karantez evidoh."
Jezuz a lavar neuze: "Bez pastor va deñvedigou."
16. Evid an eil gwech e houlenn outañ:
"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?"
Respont a ra: "Ya, Aotrou, c'hwi 'oar am eus karantez evidoh."
Hag e lavar Jezuz dezañ: "Bez pastor va deñved."

17. Evid an drede gwech e houlenn outañ:

"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?"

Per a zav glahar ennañ, ablamour ma houlenn outañ evid an drede
gwech: "Ha kared a rez ahanon?"

ha respont a ra dezañ: "Aotrou, c'hwi 'anavez peb tra,
c'hwi 'oar am eus karantez evidoh."

Jezuz a lavar dezañ: "Bez pastor va deñved.

18. E gwirionez, m'hen lavar dit: Pa oas yaouankoh,
e lakes da-unan da houriz en-dro dit, hag ez ees d'al leh ma kares;
med, pa vi deut koz, eh astenni da zivreh,
hag unan all a lako dit da houriz

hag a gaso ahanout d'al leh na fell ket dit."

19. Kement-se a lavare Jezuz evid rei da intent
dre beseurd maro e tlee Per renta gloar da Zoue.

OREZONOU DERHENT GOUEL PER

KEMPEDENN - Ho pedi a reom, Doue oll-halloudeg, da vired na vefe morse
laoskeet or halon gand strafill ebed,* pegwir ho peus on diazezet
war feiz an Ebestel, stard evel eur roh. Dre Or Zalver Jezuz Krist...

WAR AR PROVOU- Dre bedenn an Ebestel sant Per ha sant Paol e houlennom
diganeoh, Aotrou Doue,* santellaad ar brovadenn kinniget amañ
gand ho pobl fidel, hag or gwalhi euz stlabez or pehejou. Dre J.K.....

GOUDE KOMUNIA - Gand ar bara euz an neñv, Aotrou Doue, ho peus or maget:*
dre bedenn an Ebestel sant Per ha sant Paol
e houlennom c'hoaz diganeoh on diwall diouz peb droug.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

GOUEL AN EBESTEL PER HA PAOL

Lennadenn Ia.- Sant Per en ereou, dilivret gand eun El.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (12/1-11)

1. En amzer-se, e oa kroget ar roue Herodez Agrippa
da ober droug da hiniennou euz an Iliz.
2. Ober a reas dibenna Jakez, breur da Yann.
3. O weled e plije kement-se d'ar Juzevien, e reas e zonzj da baka Per ivez;
deiziu gouel ar Pask a oa neuze.
4. Paket Per, e reas taoler anezañ er prizon,
o lakaad d'e ziwall pevar rumm a bevar zoudard;
goude ar Pask e sonje digas anezañ da veza barnet dirag ar bobl.
5. Epad m'edo Per diwallet er prizon,
edo an Iliz heb ehan o pedi Doue evitañ.
6. Erru ar houlz ma tlee Herodez e zigas dirag ar bobl, en nozvez-se end-eeun,
edo Per o kousked etre daou zoudard, staget gand diou jadenn;
ha gwardou all a oa dirag an nor o tiwall ar prizon.
7. Ha setu eun El d'an Aotrou Doue o tigouezoud,
ha sklerijenn o skedi er gambr;
eun taol a ro da Ber en e gostez d'e zihuni, en eur lavared: "Sao buan."
hag e kouez ar jadennou euz e zaouarn.
8. An El a lavar dezañ neuze: "Lak da houriz ha da voutou." Hen ober a ra.
Ha da houde: "Gwisk da vantell ha deus ganin."
9. Per eta a ya er-mêz da heul an El, heb gouzoud re vad ha gwir e oa
ar pez a hoarveze gantañ a-berz an El;
kaoud a ree dezañ beza o huñvreal.

10. Treuzet ganto ar post-gward kenta, hag an eil,
e tigouezont dirag an nor-houarn a sko war kêr,
hag an nor, anezi heh-unan, a zigor dirazo.
Eet er-mêz, e reont hent 'hed eur ru,
hag en eun taol ez a an El kuit dioutañ.
11. Per neuze, deut ennañ e-unan, a lavar: "Bremañ e houzon ervad
e-neus Doue digaset e El evid va zenna a dre daouarn Herodez
hag euz ar pezh m'edo o hortoz pobl ar Juzevien."

SALM 33 / 2-3, 4-5, 6-7, 8-9.

Diskan: El Doue a vez war-dro an dud fidel,
..... prest atao d'o dilivra.

pe: Va diwallit, Elig Doue,
.... Chomit ganin e peb mare. (ton n° 138)

2. Me 'lavarao bennoz da Zoue e peb amzer,
e veuleudi bepred war va muzellou.
3. En Aotrou Doue e lakan va enor;
ouz va hleved, ra vo laouen an dud fidel.
4. Rentit gloar da Zoue ganin; oll a-unan meulom e ano.
5. Rag, pa zavan va mouez warzu Doue, e vezan selaouet gantañ;
va dizamma 'ra euz peb enkreiz.
6. Pa droer ar zellou warzu ennañ, e vezer er sklerijenn,
heb aon da ruzia gand ar véz.
7. Unan pe unan e-neus kriet a-greiz e drubuill:
Doue a glev hag hen dizamm euz e anken.
8. El Doue a vez war-dro an dud fidel, prest atao d'o dilivra.
9. Grit eun tañva, ha komprenit pegen mad eo an Aotrou;
eüruz an dén a lak e fizians ennañ.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (16/13-19)

13. Deut e oa Jezuz e kornad bro Kêzarea-Filip.
Ober a ra ouz e ziskibien ar goulenn-mañ:
"War a lavar an dud, piou eo Mab an dén?"
14. Respont a reont: "Lod a lavar Yann Vadezour, lod all Eliáz,
lod all c'hoaz Jeremiáz, pe unan euz ar brofeted."
15. Neuze e houlenn Jezuz outo: "Ha c'hwi, piou a lavarit ez on-me?"
16. Simon Per a ro ar respont: "Ar Mesiaz oh-c'hwi, Mab an Doue beo."
17. Jezuz neuze a lavar dezañ: "Eüruz out, Simon, mab da Yona;
rag n'eo ket gand da natur korv ha gwad ez out bet sklerijennet,
med gand va Zad euz an neñv.
18. Ha me, d'am zro, a lavar dit: Te a zo 'Roh, (Per)
ar roh a zavin warnañ va Iliz,
ha na vo morse treh dezi galloud ar maro.
19. Ha dit eo e roin alhweziou rouantelez an neñvou.
Ha kement tra az po liammet war an douar, a vo liammet en neñvou ivez;
kement tra az po diliammet war an douar, a vo diliammet en neñvou ivez.

OREZONOU GOUEL PER HA PAOL

KEMPEDENN. - An deiz-mañ leun a levenez ho peus roet deom, Doue oll-halloudeg,
evid enori an Ebestel sant Per ha sant Paol: * roit d'hoh Iliz ar hras
da heulia penn-da-benn kelennadurez an Ebestel, a zo bet enni
kenta prezegerien ar feiz. Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab.....

WAR AR PROVOU. - Da heul ar provou a zigasom deoh da zakri, Aotrou Doue,
ra zavo davedoh pedenn an Ebestel sant Per ha sant Paol,
evid or zikour da gaoud ho pardon hag ho skoazell. Dre J.K., or Zalver.

GOUDE KOMUNIA. - Roet ho peus nerz deom adarre, Aotrou Doue, dre ar gomunion: *
grit deom beva en hoh Iliz evel gwir gristenien, fidel d'ar zakra-
manchou ha da feiz an Ebestel, hag unanet en ho karantez beteg kaoud
eur galon hag eun ene hebkén. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

TRIZEGVED SUL ORDINAL

Lennadenn Ia. - Kentel verr ha sklêr da lavared n'eo ket Doue
e-neus grêt ar maro

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ (1/13-15 ha 2/23-24)

13. N'eo ket Doue e-neus grêt ar maro,
ne vez ket laouen o weled an dud o vervel.
14. Krouet e-neus ar bed, evid rei d'an oll draou ar beza hag ar beva,
ha yahuz e-neus grêt ar grouadurien, heb poezon da laza,
ha n'eo ket an douar rouantelez an Ankou.
15. Rag ar vuez bevet ervad n'eus termen ebed dezi.
- 2/23. Doue e-neus krouet an dén evid beva divarvel,
grêt e-neus anezañ da denna dezañ.
24. Dre warizi an diaoul eo e teuas ar maro er bed,
her gouzoud a raio diwar o houst ar re 'zo euz e gostezenn.

SALM 29 / 2,4, 5-6, 11,12a,13b. Diskan: Meuleudi deoh, Aotrou Doue,
..... rag va zaveteet ho peus.

2. Hp meuli 'ran, Aotrou Doue, rag va zennet ho peus euz ar puñs,
ha n'ho peus ket roet joa d'am enebourien diwar va houst.
4. Diframmet ho peus va buez digand an Ankou;
e-leh va lezel da ziskenn er béz, ho peus va mired beo.

5. Kanit gloar d'an Aotrou, c'hwi e dud fidel,
bennigit e ano santel;
6. rag e gounnar ne bad ket, med e vadelez 'zo evid ar vuez;
diouz an noz e teu deor an daelou,
diouz ar mintin e kaner laouen.
11. Selaouit, Aotrou Doue, ha kemerit truez ouzin;
Aotrou, deuit d'am zikour.
12a. P'edon e kañv, ho peus grêt din tridal laouen.
13a. Aotrou, va Doue, mil bennoz deoh da viken!

Eil Lennadenn.- O veza bet peb tra digand Doue, e tleom
.....beza prest da ranna gand or breudeur. Sant
Paul, en eur houlenn ober eur gest, a ra d'e gristenien
sonjal e karantez Or Zalver, en em hrêt paour evidom oll.

PENNAD EUZ EIL LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (8/7 sq.)

7. Va breudeur, sonjit pegen stank ho peus resevet donezonou a beb seurd:
feiz, prezeg, mall da ober peb tra vad,
karantez silet ganeom en ho kalonou;
bezit eta ken brokuz all gand gras an aluzenn-mañ.
9. Gouzoud a rit pegen brokuz eo bet Jezuz Krist, on Aotrou:
evitañ da veza pinvidig, eo en em lakeet paour ablamour deoh,
evid ma savfeh da binvidig diwar e baourentez.
13. N'eo ket da lavared, evelato, e tleit (pe: e vefe dao deoh)
koueza en dienez, evid dizamma re all,
med beza par an eil d'egile.

14. En amzer a-vremañ, ar pezh ho peus a re (pe: da ziuveri)
a zeuio war zikour dienez ar re all,
evid ma teuint, d'o zro, gand ar pezh o deus a re,
war zikour ho tienez deoh;
15. hag evelse e vo kement ha kement d'an oll, hervez m'eo skrivet:
"An hini e-noa dastumet kalz n'e-noa netra a re,
hag an hini e-noa dastumet nebeud ne ree netra diouer dezañ."

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia...

*** Ar pennad Aviel a heller krenna diwarnañ an 10
gwerzad diarbenn pare ar vaouez (gw. 25-34)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (5/21-43)

21. Jezuz a oa tremenet en-dro, gand ar vag, en tu all d'ar mor,
hag eun engroez vraz a dud a oa diredet d'e gaoud;
war ribl ar mor edo.
22. Dond a ra beteg ennañ unan euz renerien ar zinagog, Jaïr e ano,
hag, ouz e weled, e kouez e-harz e dreid.
23. E bedi a ra dalhmad da zond d'e di, en eur lavared:
"Va merh a zo dare (pe: prest) da vervel,
deuit d'astenn ho torn warni, evid ma pareo ha ma chomo beo."
24. Mond a ra Jezuz gantañ, hag eur bobl vraz a dud a ya d'e heul
hag a enk anezañ stard.

-----*** Evid al lennadur diverret, lezel ar gwerzadou 25-34.-----

25. Bez' e oa eur vaouez, klañv gand an diwada abaoe daouzeg vloaz,
26. hag he doa gouzañvet kalz a-berz liez medisin,
ha dispignet ganti heh oll feadra, heb kaoud gwellaenn ebed,
med kentoh o vond war wasaad.

27. O veza klevet doare Jezuz, ez eo deut e-touez an dud a-dreñv da Jezuz,
hag he deus stoket (pe: touchet) ouz e vantell.
28. Lavared a ree outi heh unan:
"Ha pa ne rafen nemed steki ouz e zillad, e vin saveteet."
29. Ha kerkent eo ehanet da goll gwad, hag he deus santet en he horv
ez eo pareet euz he hleñved.
30. Ken buan all, Jezuz a oar ennañ e-unan ar vertuz a zo eet dioutañ;
ober a ra tro warzu ar bobl, en eur houlenn:
"Piou e-neus stoket ouz va dillad?"
31. E ziskibien a lavar dezañ: "Gweled a rit an engroez tud o vaha warnoh,
hag e houlennit: Piou e-neus stoket ouzin?"
32. Eñ a zelle tro-dro dezañ, evid gweled an hini he doa grêt kement-se.
33. Ar vacuez, neuze, aon warni hag o kréna,
pa oar petra 'zo c'hoarvezet ganti,
a zeu da goueza e-harz e dreid,
hag a lavar dezañ ar wirionez penn-da-benn.
34. Jezuz a lavar dezi: "Va merh, ho feiz he deus ho saveteet;
kerzit e peoh, ha bezit pareet euz ho kleñved."
- *** Amañ e kroger adarre ma vez bet diverret. -----
35. Epad m'emañ o komz, * e tigouez tud euz ti ar rener-sinagog
da lavared dezañ: "Da verh a zo maro,
perag tregasi c'hoaz ar Mestr?"
36. Jezuz, o veza klevet ar gaoz, a lavar d'ar rener-sinagog:
"Arabad kaoud aon, bez feiz hebkén."
37. Ne ro aotre da zén ebed da vond gantañ,
nemed da Ber, Jakez ha Yann, breur Jakez.
38. Dond a reont eta beteg ti ar rener-sinagog,
ha Jezuz a wel an dud oh ober trouz braz, o ouela hag o krial forz.
39. Eet e-barz an ti, e lavar dezo:

"Perag seurd trouz ha gouelvan ganeoh?

Ar plahig n'eo ket maro, kousket eo."

40. An dud en em lak d'ober goap anezañ.

Med eñ a ra dezo oll mond er-mêz,

a gemer gantañ tad ha mamm ar plahig, hag an diskibien deut d'e heul,
hag a antre el leh m'emañ ar plahig.

41. Kregi 'ra e dorn ar plahig, hag e lavar dezi:

"Taliza koum", da lavared eo: Merhig, me 'lavar dit, sao!

42. Kerkent emañ ar plahig en he zao, hag e stag da vale,

rag daouzeg vloaz eo.

Kerkent ive setu an dud-se er-mêz anezo o-unan gand ar zouez.

43. Jezuz a zivenn stard outo na vefe gouezet gen ebed,

hag a lavar rei dezi da zebri.

***** OREZONOU AN DEGVED SUL *****

KEMPEDENN. - Aotrou Doue, c'hwi a lak an oll gristenien da gaoud ar memez
bolontez: * grit deom kared ho kourhemennou ha c'hoantaad ar madou
a brometit, hag evelse, tra ma vez peb tra o trei er bed-mañ,
chom heb distaga or halonou euz bro ar wir levez. Dre Jezuz Krist.....

WAR AR PROVOU. - Digemerit gand madelez, Aotrou Doue, ar provou a ouestlom
deoh, * ha grit ma teuio deom diwarno peb gras ha peb skoazell da viken.

GOUDE KOMUNIA. - Maget gand eur zakramant ken dispar, ni ho ped, Aotrou Doue; *
grit ma kavim ennañ donezonou a zilvidigez,
ha ma ne skuizim morse o rei deoh meuleudi. Dre J.K. or Zalver.

XIV^{ed} SUL ORDINAL

Lennadenn Ia. - Doue a gas e brofeted, da lavared eo: tud
karget da gomz euz e berz. Med peseurd digemer
a vo grêt d'ar profed? Selaouet e vo, pe ne
vo ket? D'an dud eo da ziviz, hirio c'hoaz...

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL (2/2-5)

2. En deiziou-se, ar Spered a hwezas ennon,
hag a reas din sevel sonn war va zreid;
hag e klevis an Aotrou o komz ouzin. Lavared a ree:
3. "Mab an den, kas a ran ahanout da gaoud paotred Israel,
daved eur boblad tud dizuj hag o deus troet kein din;
i hag o zadou o deus torret va lezenn beteg an deiz a hirio.
4. D'ar baotred-se, pennou karn (pe: divêzet) ha kalonou kaledet,
e kasan ahanout.
Te a lavaro dezo: "Evelhénn e komz an Aotrou Doue.
5. Dezo da zelaou pe da jom heb ket - rag eur ouenn dud dizuj int -,
e ouezint ez eus eur profed en o zouez."

SALM 122 / 1-2a, 2bcd, 3-4. Diskan (4 x 8) Warzu ennoh, Aotrou Doue,
E troan sellou va ene,
War evez ouz ho polontez,
Hag o hedal ho trugarez.

1. Warzu ennoh e vez savet ganin va daoulagad, c'hwi, azezet e lein an neñv,
- 2a. evel ma vez ar zervicherien paret o daoulagad ouz dorn o mestr.
- 2bcd. Evel ma vez eur vatez paret he daoulagad ganti ouz dorn he mestrez,
evelse e chom on daoulagad paret ganeom ouz an Aotrou, on Doue,
kén na gemero truez ouzom.
3. Ho pet truez ouzom, Aotrou Doue, ho pet truez ouzom;
rag dreist or gwalh om bet karget a zismegans;
4. Dreist e walh e-neus bet on ene, gand goaperez an dud o devez leun o hov,
gand dispriz ar re 'vez c'hwezet gand al lorh.

Eil Lennadenn. - Seul vui a zonezonou e-neus bet an Abostol, seul
vui e oar n'eo kreñv nemed gand nerz Or Zalver.

PENNAD EUZ EIL LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (12/7-10)

7. Va breudeur, evid mired ouzin d'en em zevel re
ablamour d'an traou dispar a zo bet dizoloet din gand Doue,
ez eus bet roet din eur flemm em horv,
eun êl da Zatan da rei din javedadou (pe: skouarniadou),
evid miret ouzin d'en em zevel re.
8. Diwarbenn hennez am eus, etre teir gwech, pedet an Aotrou Krist
ma 'z aje pell diouzin.
9. Med lavaret e-neus din: "Trawalh az peus gand va gras;
er wanijenn eo e teu va nerz da bara en he haerra."
A greiz kalon eta e lakin va foug er pezh a zo gwan ennon,
evid ma tiskenna ennon nerz an Aotrou Krist.
10. Ablamour da-ze, en em blijan (pe: e vouran) er gwanderiou, en dismegansou,
en diouerou, en heskinou, en enkreziou gouzanvet evid ar Zalver.
Rag, pa vezan dinerz, neuze eo e vezan kreñv.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (6/1-8)

1. En amzer-se, e oa deut Jezuz d'e vro hinidig, e ziskibien d'e heul.
2. Da geñver deiz ar zabad, ez a da gelenn er zinagog;
kalz a dud, ouz e gleved, a jome bamet, hag a lavare:
"Euz a beleh e teu da hemañ kemend all?
Pebez furnez a zo bet roet dezañ!
ha pebez burzudou a hoarvez dre e zaouarn!"
3. Daoust ha n'eo ket eñ ar halvez, mab Mari,
breur da Jakez, da Jozef, da Jud ha da Zimon?
Daoust ha n'emañ ket e hoarezed ive amañ en on touez?"
Ha ne oant ket evid kaoud feiz ennañ.
4. Ha Jezuz a lavare dezo: "Eur profed ne vez disprizet nemed en e vro,
en e gerentiaj, hag en e di e-unan."
5. Ha ne oa ket evid ober eno burzud ebed; eun nebeud klañvourien
a bareas koulskoude, en eur lakaad e zaouarn warno;
6. Souezet e chome gand o diouer a feiz. Tremen a ree dre ar hêriadennou
tro-war-dro, o rei e gelennadurez.

***** OREZONOU AR XIVED SUL *****

KEMPEDENN.- Aotrou Doue, dre ho Mab diskennet da gemer on natur ha da houzañv
ar maro, ho peus laket en he zao gouenn an dud kouezet ken izel;*
roit d'ho pugale fidel eul levenez paduz, ha, goude beza on tennet
diwar hent an ivern, grit deom beza eüruz da viken er baradoz. Dre.....

WAR AR PROVOU.- Ar zakrifis ez eom da ginnig deoh, Aotrou Doue,* grit ma
walho ahanom, ha ma ray deom beva muioh-mui, a zeiz da zeiz, euz buez
an neñv.

GOUDE KOMUNIA.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma vim karget a vuez gand Or
Zalver Jezuz Krist, kinniget ganeom e sakrifis ha resevet er gomunion;*
stag ouzoh da vad dre ar garantez, grit deom dougen frouez paduz.

Xved SUL ORDINAL

Lennadenn Ia..- Selaouom eur profed o tiskleria n'eo ket eñ
e-neus kemeret e garg, med Doue e-neus e zibabet.

PENNAD. EUZ LEVR AR PROFED AMOZ (7/12-15)

12. En deiziou-se, e lavaras Amaziaz, hag a oa beleg e Bethel,
d'ar profed Amoz: "Kae kuit gand da weledigeziou!
teh da Vro-Juda: du-hont az po bara da zebri,
hag e helli c'hoari da brofed;
13. Med paouez d'henn ober amañ e Bethel,
rag eur zantual d'ar roue eo Bethel,
eun templ euz ar rouantelez."
14. Respont a reas Amoz da Amaziaz:
"Me ne oan na profed, na mab d'eur profed;
mesaer (pe: pastor deñved) e oan, ha sevel gwez fñez a reen ivez.
15. An Aotrou Doue eo e-neus va hemeret euz a-dreg an tropell,
hag e-neus lavaret din: "Kae da brofed evid va fobl Israel."

SALM 84 / 9ab-10, 11-12, 13-14.

Diskan: Diskouezit deom, Doue, ho madelez,
ha roït deom nerz ho silvidigez.

9ab. Selaou a rin petra 'lavaro Doue, an Aotrou:

Ar peoh evid e bobl, setu e gomzou.

10. Erru eo tost e zilvidigez d'an dud a zouj anezañ;
E hloar a zeuio da jom war an douar.

11. Madelez ha gwirionez a ya an eil da gaoud ebén,
justis ha peoh d'en em vriata;
12. Ar wirionez a ziwano euz an douar, hag euz an neñv e stouo ar justis.
13. An Aotrou Doue a zigaso eürusted, hag an douar a zougo e frouez.
14. Ar justis a gerzo en e raog, hag a zigoro hent d'ar zilvidigez.

Eil Lennadenn. - Anavezet om bet gand Doue a-viskoaz, ha
choazet gand e garantez evid beza salvet en Or Zalver.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (1/3-14)

(*Ma vez tro da ziverra, lenn beteg gw.10)

3. Meulet ra vezo Doue, Tad Jezuz Krist, on Aotrou.
Euz lein an neñv, e-neus karget ahanom
a beb seurd bennoziou speredel én Aotrou Krist.
4. Evelse, er Zalver e-noa or choazet, abarz ma oa krouet ar bed,
evid beza santel ha dinamm dirazañ, er garantez.
5. Divizet e-noa a viskoaz ober ahanom e vugale, dre Jezuz Krist hag
evid beza unanet gantañ,
ha kement-se hervez m'eo bet plijet gand e vadelez,
6. evid rei tro da veuli gand gloar ar hras dispar
e-neus roet deom, dre garantez nemedkén, én e Vab karet.
7. Er Mab-se, ha dre e wad, on eus ar zilvidigez, ar pardon euz or pehejou,
ken puill ma 'z eo e hras,
8. skuillet ennom a-founn d'or harga a furnez hag a skiant.
9. Doue, erfin, e-neus roet deom sklerijenn war menoz kuz e volonteiz,
ar menoz karantezuz divizet gantañ
evid beza sevenet pa vije deut ar mare,

10. da lavared eo: unani en-dro an oll draou, koulz en neñv ha war an douar,
 én Aotrou Krist, penn uhella ar bed krouet.
11. Ya, én Aotrou Krist ez om bet, ni, bugale Israel, kemeret da veza e bobl,
 merket ma oam a viskoaz,
 dre volontez an hini a zigas da wir kement tra a'fell dezañ,
12. evid beza eur veuleudi d'e hloar,
 ni hag a oa on esperans er Zalver pell a oa.
13. Ha c'hwi ivez, goude m'ho peus klevet komzou ar wirionez,
 ar helou mad euz ho silvidigez, hag ho peus kredet ennañ,
 én Aotrou Krist ho peus resevet siell Spered Santel ar bromesa,
14. ar Spered-se hag a zo an arrez euz on heritaj,
 da hortoz ma vo peurechu silvidigez an dud dasprenet gand Doue,
 evid meuleudi e hloar.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia!

(Evel ma oa profeted al Lezenn goz kaset gand
 Doue, an Ebestel a zo kaset da brezeg gand Jezuz)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (6/7-13)

7. En amzer-se, Jezuz a halv an Daouzeg d'e gaoud;
 kregi a ra da gas anezo, daou ha daou,
 en eur rei dezo galloud war an droug-sperejou.
8. Gourhemenn a ra dezo chom heb kemer netra ganto evid an hent,
 nemed eur vaz hebkén: na tamm bara, na bisah,
 na mounreiz en o gouriz;
9. "Lakit en ho treid, emezañ, eur re zandalennou,
 ha na gemerit ket diou zae."
10. Lavared a ra dezo c'hoaz:

10. "E kement leh ma 'z eot, pa viot antreet én eun ti,
chomit eno, beteg ma 'z eot kuit euz al leh-se.
11. Peleh bennag na viot ket digemeret ennañ, na selaouet,
it kuit en eur heja ar boultrenn euz ho treid,
da lakaad an tamall warno."
12. Eet en hent, edo an Ebestel o prezeg d'an dud
ez eo red kaoud keuz d'o fehejou.
13. Argas a reent diaoulou e-leiz, oleva kalz klañvourien,
ha rei dezo ar pare.

***** OREZONOU AR X^{ved} SUL *****

KEMPEDENN.- Aotrou Doue, c'hwi a ro d'an dud diañket sklerijenn ho kwirionez,
evid ma hellint distrei war an hent mad;*
grit da gement hini a zoug an ano a gristen, trei kein
trei kein d'ar pezh na zere (pe: na zigouez) ket ouz an ano-se,
hag heulia ar pezh a zere outañ.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo
ganech ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU.- Taolit ho sellou, ni ho ped, Aotrou Doue,
war ar provou a ginnig dech an Iliz ouz ho pedi;*
grit d'ho tud fidel reseo evid o zilvidigez
ar provou-se pa vint bet konsakret. Dre Jezuz Krist, or Z.

GOUDE KOMUNIA.- P'on eus resevet ar zakramant, ni ho ped, Aotrou Doue,*
ma kresko ennom, o kemer perzh en overenn, ar frouez a zilvi-
digez. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

XV^{ed} SUL ORDINAL

Lennadenn Ia.- Doue 'fell dezañ argas ar bastored fall
..... a göll'e bobl; en o flas e lakaio pastored vad.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ (23/1-6)

1. Komz an Aotrou Doue eo. Gwaz a-ze d'ar bastored
a lez da vond da goll ha da redeg deñved va zachenn.
2. Setu perag evelhénn e komz an Aotrou, Doue Israel,
ouz ar bastored a zo e penn va fobl:
C'hwil 'zo penn-kaoz m'eo eet da goll ha da redeg va deñved,
ha n'ho peus ket intentet outo.
Emaon-me o vond war ho tro, ablamour d'hoh oberou fall.
Lavar an Aotrou eo.
3. Ha me va-unan a zastumo an nemorant euz va deñved
euz kement bro 'leh m'am eus o strêvet, evid o digas d'o frajeier;
frouez a zougint, ha kreski 'raint.
4. Lakaad a rin en o fenn pastored hag a basko anezo;
n'o devo mui nag aon na spont, hini ebed ne day da goll.
Lavar an Aotrou eo.
5. Setu deiziou o tond, eme an Aotrou,
ma lakin da ziwan, diwar gwad David, eur greskenn divlamm:
bez' e vo roue, furnez e-no,
lakaad a ray ar gwir hag al lealded da rén er vro.
6. En deiziou-se, e vo salvet Juda, ha pobl Israel a vevo er peoh.
Ha dre an ano-mañ e vo anvet: "an Aotrou-or justis."

SALM 22 / 1-3a, 2bc-4, 5, 6. Diskan: Doue eo va fastor,
..... ne vanko din netra; (Cf. Breiz a gan,
rag war ar peuri druz (n° 3, p.36,
am has da ziskuiza. (S.13.

1. An Aotrou eo va fastor, n'am eus diouer a netra.
2. War ar prajou geot tener e ra din gourvez;
daved doureier an diskuiz e kas ahanon,
- 3a. ha nerz fresk a ro d'am ene.
- 3b. Va heñcha 'ra dre ar gwenojennou surra, evid enor e ano.
4. Ha pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou,
n'am eus aon rag droug ebed, rag c'hwi 'zo ganin.
Ho penn-baz hag ho kwalenn am laka dineh.
5. Evidon e lakit an daol, dirag sellou va enebourien;
an eoul c'hwéz-vad a skuillit war va fenn,
ha va halir (pe: va skudell) a zo leun-barr.
6. Eürusted, gand ho madelez, a vo va lod, bemdez 'hed va buez;
digemer a gavin e ti an Aotrou, epad hir amzer.

Eil Lennadenn.- Dre Jezuz Krist e teu ar peoh d'an dud
..... kenetrezo, koulz hag etrezo ha Doue.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (2/12-18)

12. Va breudeur, gwechall oh bet heb Salver, en diavêz da bobl Israel
ha da bromesaou heh emgleo gand Doue;
bez' oh bet e-kreiz ar bed heb esperans hag heb Doue.

13. Bremañ, p'emaoh er Zalver Jezuz,
c'hwi hag a oa pell, a zo deut da veza tost dre wad Or Zalver.
14. Rag eñ eo evidom ar peoh:
euz an daou rummad tud, Israel hag ar bayaned, e-neus grêt unan hebken
diskaret e-neus ar voger a lake disparti etrezo, ar gasoni.
15. Dre e gorv staget ouz ar groaz, e-neus taolet d'an traoñ
Lezenn Moizez gand he gourhemennou hag he reolennou;
evelse e felle dezañ, euz an daou rummad tud,
kroui ennañ unan hebkén, eun den nevez, en eur zigas ar peoh.
16. An eil rumm hag egile, grêt anezo eur horv hebkén,
a zo fellet dezañ ivez o lakaad e peoh gand Doue dre e groaz,
pa 'neus, ennañ e-unan, roet taol ar maro d'ar gasoni.
17. Deut eo da zigas kelou mad ar peoh
deoh-c'hwi hag a oa pell, ar peoh ive d'ar a oa tost;
18. rag drezañ on eus, an eil rumm hag egile, er memez Spered,
dor zigor da vond da gaoud an Tad.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (6/30-34)

30. En amzer-se, goude o zroiad prezeg kenta,
eo deut an Ebestel asamblez daved Jezuz,
hag e roont kelou dezañ euz kement o deus grêt ha prezeget.
31. Jezuz a lavar dezo: "Deuit a-gostez en eul leh distro,
evid kemer eun tamm diskuiz."
Ken stank e oa an dud o tond d'e gaoud hag o vond kuit,
ma n'o doa ket amzer zokén da zebri.
32. Mond a reont kuit eta er vag, da gaoud eul leh distro,
evid beza en o fart o-unan.

33. Med gwelet int bet o vond kuit,
ha kalz tud o deus komprenet da beleh ez eent;
war o zroad e tiredont di, euz an oll gêriadennou,
hag en em gavont erru en o raog.
34. Jezuz, eta, en eur ziskenn euz ar vag, a wel eun engroez vraz a dud,
ha truez a gemer outo,
ablamour m'emañt evel deñved ha n'o deus ket a bastor.
Staga 'ra neuze da gelenn anezo war meur a dra.

OREZONOU AR XVII^{ed} SUL

KEMPEDENN. - Aotrou Doue, o kaoud truez hag o pardoni e tiskouezit ar gwella
ez oh oll-halloudeg;* skuillit 'ta muñh-mui ho trugarez warnom,
ha grit deom kerzed gand mall war hent ho promesaou,
da hounid on lod e madou ar baradoz.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU. - Aotrou Doue, gand sakrifikis ar groaz c'hwi ho peus savet,
e-leh sakrifikisou lies-seurd al Lezenn goz, ar zakrifikis parfet ha
nemetañ;* resevit digand ho tud fidel provadenn ar zakrifikis-se,
ha skuillit ho pennoz warni, evel gwechall war provou Abel,*
evid ma talvezo da zilvidigez an oll ar pezh a ginnig deoh peb unan.

GOUDE KOMUNIA. - Emaom ouz ho pedi, Aotrou Doue: evel ma vezom, gand tro ar
vuez, atao o kerzed euz an traou tremenet warzu re nevez,*
grit deom dilezel a-grenn ar vuez a-wechall er pehed,
evid rén ar vuez nevez gand ho spered a zantelez en or halonou.

Kenvr. ar Brezoneg - Kaier VII

GOUEL SANTEZ ANNA

Lennadenn Ia.- Ar bromesa grêt gand Doue da Abraham, ha d'e vab
Izaag war e lerh, diwarbenn o lignez, a zo tost ouz
 he zermen gand santez Anna ha sant Joachim, he fried.

PENNAD EUZ LEVR PENN KENTA AR BED (26/2-5)

2. En deiziou-se, an Aotrou Doue 'n em ziskouezas da Izaag,
 hag a lavaras dezañ: "Na ziskennit ket da Vro-Ejipt,
 med chomit er horn-douar a verkin deoh.
3. Grit ho chomaj er vro-mañ; me a vo ganeoh hag ho pennigo.
 Deoh ha d'ho pugale e roin oll an douarou-mañ,
 evid derhel d'al le am eus touet da Abraham ho tad.
4. Ho lignez a lakin da greski, ken stank hag ar stered en oabl,
 ha d'ho pugale e roin ar vro-mañ a-bez.
 Dre ho lignez e vo benniget oll boblou ar bed,
5. abalamour m'e-neus Abraham sentet ouz va mouez,
 ha miret va gourhemennou, va reolennou ha va lezennou."

SALM 44 /3,8, Is.44/3

Diskan: O Rouanez karet an Arvor, O Mamm leun a drué,
 War an douar, war vor, Mirit ho pugale.

- 44/3. Na pegen kaer oh-c'hwi, - ken koant ho muzellou!
 Rag-se oh benniget - gand Doue da viken.
8. C'hwi 'peus karet ar mad, - ha tehet diouz an droug;
 rag-se oh gand Doue - sakret gand eoul ar joa.

Is. 44/3. Me 'skuillo va spered - war ho lignez a-bez;
me 'daolo va bennoz - war oll ho pugale.

Eil Lennadenn.- (Unan euz ar re kinniget war Roll al
..... Lennadennoù, "Ordo Lectionum"; bez' e
heller krenna goude ar gw. 10, pe 12.)

- Sklerijenn dispar war ar pezh m'eo Doue: karantez!

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (4/7-16)

7. Va re muia karet, en em garom an eil egile,
pegwir eo ar garantez euz a Zoue,
ha kement hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue
hag e-neus anaoudegez a Zoue (pe: euz Doue).
8. An neb n'e-neus ket karantez n'anavez ket Doue,
rag Doue a zo karantez.
9. Evelhénn eo deut karantez Doue da bara en on touez:
e Vab unganet e-neus Doue kaset er bed, deom da gaoud buez drezañ.
10. Amañ eo emañ ar garantez: n'eo ket ni on eus karet Doue,
med eñ an hini e-neus karet ahanom ha kaset e Vab
da veza roet e sakrifik evid pardon ar pehejou.
11. Va re muia karet, pegwir e-neus Doue or haret evelse,
ni, d'on tro, a dle kaoud karantez an eil evid egile.
12. Doue n'e-neus dén gwelet anezañ biskoaz;
med, ma 'n em garom an eil egile, emañ Doue o chom ennom,
hag e garantez a zo ennom en he haerra.

13. Gand an dra-mañ ez om sur emaoom o chom ennañ, hag eñ o chom ennom:
perz en e Spered e-neus roet deom.
14. Ha ni, p'on eus gwelet gand on daoulagad, ni a ro testeni
e-neus an Tad kaset e Vab da veza Salver ar bed.
15. Kement hini a ziskleir eo Jezuz Mab Doue,
emañ Doue o chom ennañ, hag eñ o chom e Doue.
16. Ha ni 'zo deut da anaoud ervad, dre ar feiz,
ar garantez e-neus Doue evidom.
Karantez eo Doue: an neb a zo o chom er garantez a zo o chom e Doue,
ha Doue 'zo o chom ennañ.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!
Ganeoh emañ komzou ar vuez.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (10/21-24)

21. En amzer-se, Jezuz e-neus tridet e galon gand levenez er Spered Santel,
hag e-neus lavaret:
"Ho meuli a ran, va Zad, Aotrou an neñv hag an douar,
ablamour m'ho peus kuzet an traou-se ouz an dud desket ha speredeg,
ha m'ho peus o dizoloet d'ar re vianig.
Ya, Tad, evelse eo bet plijet ganeoh.
22. Peb tra a zo bet roet din gand va Zad,
ha dén ebed n'anavez piou eo ar Mab, nemed an Tad,
na kennebeud piou eo an Tad, nemed ar Mab,
ha kement hini a vo plijet gand ar Mab hen diskleria dezañ."
23. Troet neuze warzu e ziskibien én o zu o-unan, e lavar dezo:
"Eüruz an daoulagad a wel ar pezh a welit-c'hwi.
24. Rag, m'hen lavar deoh, stank eo bet ar brofeted hag ar rouaned
o defe karet gweloud ar pezh a welit, ha n'o deus ket gwelet,
klevoud ar pezh a glevit, ha n'o deus ket klevet."

OREZONOU evid GOUEL SANTEZ ANNA

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, ho peus roet da zantez Anna
ar hras da lakaad er bed ar Werhez Vari, mamm d'ho Mab karet:*
ni ho ped, da geñver he gouel, ma vo-hi evidom
eun alvokadez vad dirazoh.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh...

WAR AR PROVOU -

Sellit gand madelez, Aotrou Doue, ouz ar zakrifis a ginnigom:*
ha grit ma talvezo deom an overenn-mañ,
gand sikour pedennou santez Anna,
da veza startoh en ho servij, ha da hounid an eürusted.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.-

(Prefas Santez Anna, Levr-overenn-aoter,p.50)

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Maget gand ar bara euz an neñv, ni ho ped, Doue, on Aotrou,*
da rei deom gras ar zilvidigez peurbaduz,
gand sikour pedennou santez Anna, he deus laket er bed
ar Werhez mamm d'Or Zalver Jezuz Krist,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll-viskoaz da virviken.

*** Kinniget evid KAN AN DIGOR, gand an diskan "D'or Mamm zantez Anna"

- | | |
|--|---|
| 1. Joa deom oll, kristenien,
gand gouel santez Anna,
A ro joa d'an Elez
o veuli Mab Doue. | 2. Ni 'zo gwir gristenien...
3. Kristenien, or baniel....
4. Gloar da Zoue an Tad,- d'ar Mab,d'ar Spered Glan,
'Vel m'eo bet a viskoaz,- bremañ ha da viken! |
|--|---|

SEITEGVED SUL Ordinal - 26 a viz Gouere 1970 -

Lennadenn Ia.- Ar bara kresket gand ar profed Elizê.
.....

PENNAD EUZ EIL LEVR AR ROUANED (4/42-44)

En amzer-se, e oa naonegez dre ar vro,

42. hag ez eus deut da gaoud Elize, dén a Zoue, eun dén euz Bâl-Salisa.

Digaset e-neus gantañ, diwar frouez kenta an eost,

ugent baraenn heiz ha greun gwiniz nevez en e visah.

"Ro d'an dud 'zo amañ, eme Elize, m'o devo da zebri."

43. Med e vevel a respont dezañ:

"Penaoz e rin evid servicha kant a dud gand an dra-ze?"

Hag Elize dezañ en-dro:

"Ro dezo, a lavaran dit, euz ar bara-se da zebri.

Rag evelhenn e komz an Aotrou Doue:

Bez' e vo da zebri, ha chom a raio c'hoaz."

44. Neuze, ar mevel a ro d'an dud, debri a reont,

ha chom a ra ouz o dilerh, hervez komz an Aotrou.

SALM 144 / 10-11, 15-16, 17-18

Diskan: C'hwi 'zigor ho torn, Aotrou Doue,

..... hag an dud o deus o gwalh.

10. C'hwi 'vo meulet, Aotrou, gand oll ho krouadurien,

hag ho tud fidel ho pennigo.

11. Displega 'raint gloar ho rouantelez,

skigna 'raint brud ho kalloud.

15. O daoulagad paret warnoh, an oll o deus fizians,
 ha c'hwi 'ro dezo o bevans d'ar mare.
16. Ho torn a zigorit, ha peb tra veo a roit dezañ e walh.
17. Leun a justis eo an Aotrou e kement a ra,
 leun a vadelez en e oll oberou.
18. Dond a ra da gichen kement hini a bed anezañ,
 kement hini a bed anezañ a wir galon.

Eil Lennadenn.- Perag e tle ar gristenien chom unanet?
..... Eur Zalver hebkén, eur feiz, eur vadiziant.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (4/1-6)

1. Va breudeur, hoh alia stard a ran,
 me hag a zo er jadennou ablamour d'Or Zalver,
 da heulia en ho puez an hent a zigouez deoh (pe: a zere ouzoh)
 goude m'oh bet galvet d'ar feiz gand Doue.
2. Bezit atao izel a galon, leun a zouster hag a basianted,
 en em houzanvit an eil egile gand karantez.
3. Lakit ho poan da vired an unvaniez, frouez ar Spered,
 pa 'z eus etrezoh liamm ar peoh.
4. Eur horv hag eur Spered hebkén a zo,
 kenkoulz ha m'oh bet galvet d'eun esperans hebkén.
5. N'eus nemed eun Aotrou Krist, eur feiz, eur vadiziant,
6. eun Doue, Tad an oll, hag a zo dreist an oll,
 e-touez an oll, hag e diabarz an oll.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist,
C'hwi ar Zalver a dlee dond er bed.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (6/1-15)

1. En amzer-se, Jezuz e-noa treuzet da vond en tu all
da vor Galilê, pe vor Tiberiad.
2. War e lerh e teue eun engroez vraz a dud,
ablamour ma welent ar burzudou a ree war ar re glañv.
3. Jezuz a bign war ar menez, hag a azez eno gand e ziskibien.
4. Tost e oa ar Pask, gouel braz ar Juzevien.
5. Jezuz, o veza savet e zaoulagad
ha gwelet eur bobl vraz a dud o tond etrezeg ennañ,
a lavar da Filip: "A beleh e prenim bara, da rei dezo da zebri?"
6. Komz a ra evelse evid e amprou,
rag eñ a oar mad petra emañ o vond da ober.
7. Respont a ra Filip: "Daou hant dinerad bara a vefe re nebeud
evid rei da bep hini eun draig bennag."
8. Unan euz an diskibien, Andreñ, breur da Zimon-Per, a lavar da Jezuz:
9. "Bez' ez eus amañ eur hrennard: (pe: eur paotr),
hag a zo gantañ pemp baraenn heiz ha daou besk;
med petra eo an dra-ze evid kemend all a dud?"
10. Neuze e lavar Jezuz: "Grit d'an dud azeza."
Bez' e oa stank ar geot el leh-se.
Azeza 'reont eta: war-dro pemp mil gwaz a zo anezo.
11. Jezuz a gemer ar baraennou, a ra ar bedenn-drugarekaad,
hag a ingal anezo etre an dud azezet;
gand ar pesked e ra kenkoulz all, kement ha m'o deus c'hoant da gaoud.
12. Eur wech bet ganto o gwalh, Jezuz a lavar d'e ziskibien:
"Dastumit an tammou a zo bet a re, da vired na dafent da goll."
13. Ober a reont eta an dastum, ha daouzeg panerad a gargont
gand an tammou 'zo chomet, diwar ar pemp baraenn heiz,
a zilerh an dud o deus debret.

14. Hag an dud-se, o weled ar burzud grêt gantañ, a lavar:

"Hemañ eo, e gwirionez, ar profed braz,
an hini 'zo o tond er bed."

15. Med Jezuz, pa oar emaint o tond d'e gemer dre nerz
evid ober o roue anezañ,
a deh adarre, e-unan penn, war ar menez.

OREZONOU evid ar XVII ved SUL

(Missale Romanum 1970)
.....

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

C'hwi 'zo, Aotrou Doue, divennou an dud a esper ennoh,
hag hebdoh n'eus netra nerzuz, netra santel:*
skuillit stank warnom grasou ho madelez,
ha grit deom, en eur heulia an hent a verkit deom,
ober seurd implij euz madou treménuz ar bed-mañ,
ma hellim dija beza krog e madou peurbaduz an neñv.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo.....

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar provou-mañ,
deuet deom diwar ho largentez:*
mister santel an overenn, a vo grêt dre nerz ho kras,
ra lako ahanom da veva santelloh er vuez-mañ,
ha da hounid eürusted peurbaduz ar bed all. Dre J.K.O.Z.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Kemeret on eus perz, Aotrou Doue, er zakramant santel
a verk evid atao ar zonj euz Pasion ho Mab karet:*
grit ma talvezo d'or zilvidigez an donezon-mañ,
roet deom gantañ e-unan en e garantez heb par.
Eñ on Doue beo, ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz...

18^{ed} SUL Ordinal

Bloavez B - 2 a viz eost 1970

Lennadenn Ia.- Penaoz e-neus Doue roet bara euz an neñv
..... evid maga pobl Israel er goueleh.

PENNAD EUZ EIL LEVR MOIZEZ (16/2-4, 12-15)

2. En deiziou-se, pobl Israel en he féz a oa o hrozmolad (pe: o sevel klemm)
er goueleh, a-eneb Moïzez hag Aaron, e vreur.
3. Paotred Israel a lavare dezo:
"Gwelloc'h e vije bet deom mervel diwar dorn an Aotrou, du-ze e Bro-Ejipt,
pa vezem azezet podadou kig dirazom, ha bara da zebri or gwalh.
Perag ho peus on digaset amañ er goueleh,
evid lakaad an oll da vervel gand an naon?"
4. Neuze e lavar an Aotrou Doue da Voizez:
"Setu ez an da lakad bara da hlava euz an neñv evidoh.
(pe: da lakad da goueza euz an neñv glao-bara evidoh)
Ar bobl a yelo er-mêz da zastum, bemdez, peadra evid eun dervez,
din-me da weled ha senti a raint, pe get, ouz va lezenn.
12. Klevet am eus bugale Israel o hrozmolad (pe: o sevel klemm).
Lavar dezo: "Goude ar huz-heol, ho po kig da zebri,
ha warhoaz-vintin, bara ho kwalh,
hag e ouezoh ez on-me an Aotrou, ho Toue."
13. Diouz an abardaez, bandennadou koailled, savet en êr,
a zo diskennet da holei ar hamp;
hag antronoz vintin, ez eus eur gwiskad gliz tro-dro d'ar hamp.
14. Eur wech savet ar gliz, e weler, war horre douar ar goueleh,
eur gwiskad tano a draouigou munud, dem-ond, skañv evel reo gwenn.

15. O weled kement-se, bugale Israel a houlenn an eil ouz egile:

"Mann-hou?", da lavared eo: Petra eo an dra-mañ?
rag n'ouzont ket petra eo.

Ha Moïzez a lavar dezo: "Bez' eo ar bara
a ro deoh an Aotrou Doue d'ho pevans."

SALM 77 / 3-4bc, 23-24, 25,54. Diskan: Roit, Aotrou Doue,
bevans d'ho pugale:
ar bara euz an neñv,
hini ar gwir vuhé.

3. Kement on eus bet klevet ha desket,
kement o deus kontet deom on tadou,

4. a lavarim d'on tro d'or bugale war on lerh:
meuleudi an Aotrou Doue, e halloud hag ar burzudou e-neus grêt.

23. Da goumoul an oabl e-neus roet gourhemenn,
ha doriou an neñv e-neus digoret.

24. Grêt e-neus d'ar mann glava warno evid o bevans,
ar gwiniz euz an neñv e-neus roet dezo.

25. Bara an êlez o deus bet an dud da zebri,
bevans e-neus kaset dezo o gwalh.

54. O heñchet e-neus beteg e zouar santel,
beteg ar menez perhennet gantañ.

Eil Lennadenn.- Sant Paol a lavar deom e tle buez ar griste-
.....nien beza disheñvel a-grenn diouz hini ar
bayaned, ar re na heuliont ket Or Zalver.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (4/17, 20-24)

17. Kement-mañ a lavaran hag a zisklerian stard a-berz an Aotrou Krist:
ne dleit ket beva mui evel ar bayaned,
a rén o buez hervez o spered diboell.
20. C'hwi, n'eo ket evelse oh bet desket e skol Or Zalver,
21. da vianna ma'z eo en ho peus selaouet
hã ma'z eo ennañ oh bet desket da veva,
evel m'emañ ar wirionez e Jezuz:
22. Red eo deoh trei kein d'ho puez tremenet,
en em zizober euz an den a behed,
a vez kaset d'en em goll gand ar hoantegeziou touelluz;
23. Red eo deoh dond da veza evel unan all en ho plas,
dre ho spered renevezet;
24. (En eur gér) red eo deoh kemer doare-beva an den neveseet,
an hini 'zo bet krouet diwar patrom Doue,
er justis hag er zantelez a gord gand ar wirionez.

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!
C'hwi eo ar bara a vuez. - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (6/24-35)

- En amzer-se, antronoz burzud ar bara kresket,
24. ar bobl he deus gwelet n'emañ ket mui Jezuz eno, nag e ziskibien;
pignet int neuze er bagou, evid mond da Gafarnaoum,
war glask euz Jezuz.
25. O veza kavet anezañ en tu all d'ar mor, e lavaront dezañ:
"Mestr, pe da vare (pe: peur) oh deuet amañ?"

26. Jezuz a respont dezo: "E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh:
war glask ahanon emaoch,
n'eo ket ablamour m'ho peus gwelet sinou burzuduz,
med ablamour m'ho peus debret ho kwalh euz ar bara.
27. Labourit 'ta, n'eo ket evid ar vagadurez a ya da 'fall,
med evid ar vagadurez a jom kaer (pe: en em vir) er vuez peurbaduz,
an hini a roio deoh Mab an den;
rag hemañ eo e-neus an Tad, Doue, merket gand e ziell."
28. An dud a lavar dezañ: "Petra on eus da ober,
evid labourad gand labouriou Doue?"
29. Respont a ra Jezuz dezo: "Hemañ eo al labour a houlenn Doue diganeoh:
lakaad ho feiz en hini e-neus digaset er bed."
30. Lavared a reont neuze: "Petra rit da zin deom,
ma welim ha ma kredim ahanoh? Peseurd oberenn a rit?
31. On tadou gwechall o deus debret ar mann er goueleh,
hervez ma lavar ar Skritur:
Eur bara euz an neñv e-neus roet dezo da zebri."
32. Jezuz a lavar dezo: "E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh,
n'eo ket Moizez e-neus roet deoh ar bara euz an neñv;
va Zad eo a ro deoh ar bara gwirion deuet euz an neñv.
33. Rag bara Doue eo an hini a ziskenn euz an neñv
hag a ro buez d'ar bed."
34. Lavared a reont dezañ: "Aotrou, roit deom bepred ar bara-se."
35. Ha Jezuz a lavar dezo: "Me eo bara ar vuez.
An neb a zeu davedon n'e-no mui naon,
hag an neb e-neus feiz ennon n'e-no mui sehed morse."

OREZONOU evid an XVIII ed SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Bezit skoazell ho servicherien, Aotrou Doue,
ha skuillit bepred ho madelez war ar re 'zo ouz ho pedi:*
pa'z int laouen o kaoud ahanoh da Grouer ha da Vestr,
roit dezo a-nevez donezonou ho karantez, hag o mirit e stad vad.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

WAR AR PROVOU.-

En ho trugarez, Aotrou Doue, plijet ganeoh santellaad ar provou-mañ,*
ha, goude beza digemeret ar brovadenn euz sakrifis Or Zalver,
lakit ahanom e stad da veza, ni ivez, eur brovadenn beurbaduz d'ho kloar.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

D'an dud a vagit gand ar bara euz an neñv,
roit bepred, Aotrou Doue, ho skoazell;
pa n'ehanit ket da domma o halonou,
grit dezo beza din euz ar zilvidigez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

Lennadenn Ia.- Ar bara roet gand Doue a zigas nerz nevez
..... d'ar profed Eliaz.

PENNAD EUZ LEVR KENTA AR ROUANED (19/4-8)

4. En deiziou-se, ar profed Eliaz, o tehed rag kounnar Yezabel,
e-noa kerzet hed eun dervez er goueleh;
eet eo d'azeza e skeud (pe: e disheol) eur vodenn valan (pe: vanal),
hag e-neus goulennet ar hras da vervel, en eur lavared:
"Trawalh am eus, Aotrou Doue! Kemerit va buez diganen,
rag n'on ket gwelloc'h eged va zadou."
5. Neuze e hourvez dindan ar vodenn valan, hag en em ro da gousked.
Med setu eun êl o tond da douch outañ,
ha da lavared dezañ: "Sav, ha depr!"
6. Eliaz a zell: e kichen e benn ez eus varaenn poazet war vein an oaled,
hag eur podad dour.
Debri hag eva a ra, ha goudeze gourvez adarre.
7. Evid an eil gwech, e teu êl an Aotrou da douch outañ ha da lavared:
"Sav, ha depr! a-hendall e vefe re hir an hent evidout."
8. Eliaz a zav, debri hag eva a ra.
Neuze, gand an nerz silet ennañ diwar ar boued-se,
e ra hent epad daou-ugent dervez ha daou-ugent nozvez,
beteg ar Menez Horeb, menez Doue.

SALM 33 /2-3, 4-5, 6-7, 8-9. Diskan: Tañvait, ha gwelit
pegen mad eo Doue.

2. Me 'lavarzo bennoz da Zoue e peb amzer,
e veuleudi bepred war va muzellou.
3. En Aotrou Doue e lakan va enor (pe: va fouge);
ouz va hleved, ra vo laouen an dud fidel.
4. Rentit gloar d'an Aotrou Doue ganin; oll a-unan, meulom e ano.
5. Rag, pa zavan va mouez warzu Doue, e vezan selaouet gantañ;
va dizamma 'ra euz peb enkrez.
6. Pa droer ar zellou warzu ennañ, e vezer er sklerijenn,
heb aon da ruzia gand ar véz.
7. Ha kriet e-neus eur paour a-greiz e drubuill,
Doue a glev hag hen dizamm euz e anken.
8. El Doue 'vez dalhmad war-dro an dud fidel, prest atao d'o dilivra.
9. Grit eun tañva, ha komprenit pegen mad eo an Aotrou Doue;
eüruz an dén a lak e fizians ennañ.

Eil Lennadenn.- Kentel sant Paol: bevit er garantez, diwar
..... batrom Doue, war roudou Or Zalver.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (4/30-5/2)

30. Va breudeur, na roit ket glahar da Spered Santel Doue,
e-neus merket ahanoh gand e ziell a-benn deiz ar zilvidigez.
31. Kement a zo c'hwervoni, kounnar, fulor, kriadeg, droug-komz,
a zo da veza argaset kuit euz ho touez,
koulz ha peb seurd fallagriez.
32. Bezit kentoh madelezuz ha trugarezuz kenetrezo,
o pardoni an eil d'egile,
evel m'e-neus Doue pardonet deoh en Aotrou Krist.

- 5/1. Bevit eta diwar batrom Doue,
pegwir ez oh e vugale muia karet.
2. Grit hent er garantez, war roudou Or Zalver:
karet e-neus ahanom, beteg en em rei e-unan evidom,
ha kinnig evelse da Zoue ar zakrifis gouest da blijoud dezañ.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! (evel d'ar zul araog).

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (6/41-51)

41. En amzer-se, ar Juzevien a oa o selaou Jezuz a oa kroget da hrozmolad
etrezo, ablamour m'e-noa lavaret:
"Me eo ar bara 'zo diskennet euz an neñv."
42. Lavared a reont: "Ha n'eo ket hemañ Jezuz, mab Jozef,
a anavezom e dad hag e vamm?
Penaos e hell lavared: Euz an neñv on diskennet?"
43. Respont a ra Jezuz dezo: "Na hrozmolit ket etrezoh.
44. Nikun ne hell dond davedon, nemed ha sachet e ve gand an Tad e-neus
kaset ahanon, ha me 'zavo anezañ da veo d'an deiz diweza.
45. Skrivet eo er brofeted: Oll e vezint kelennet gand Doue.
Kement hini e-neus selaouet an Tad ha resevet e gelennadurez
a zeu davedon.
46. N'eo ket e-nefe nikun gwelet an Tad, nemed an hini a zo a Zoue;
hennez hebken e-neus gwelet an Tad.
47. E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh,
an hini e-neus feiz ennon e-neus ar vuez peurbaduz.
48. Me eo bara ar vuez.
49. Ho tadou o deus bet ar mann da zebri er goueleh, ha marvet int.

..... /

50. Hemañ eo ar bara a ziskenn euz an neñv
evid mired da vervel an neb a zebro anezañ.
51. Me eo ar bara beo, a zo diskennet euz an neñv;
an neb a zebro euz ar bara-mañ a vevo da viken,
hag ar bara a roin eo va horv, da rei buez d'ar bed.

OREZONOU evid an XIX^{ed} SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
c'hwi hag a gredom pedi en eur lavared deoh "On Tad",
lakit da vad en or halonou ar spered a ra ahanom gwir vugale deoh,
evid ma hellim kaoud perz en heritaj prometet.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha
gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

WAR AR PROVOU.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer provadenn hoh Iliz,
pegwir c'hwi eo, en ho madelez, ho peus o roet deom evid kinnig deoh,
ha c'hwi eo, dre nerz ho kalloud, a ra dezo trei da veza
sakramant or zilvidigez. Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Ar gomunion on eus grêt, Aotrou Doue, o reseo ho tonezon er zakramant,
ra dalvezo deom da veza salvet,
ha da veza starteet e sklerijenn ho kwirionez. Dre J.K.O.Z.

DERHENT GOUEL MARIA HANTER EOST - Overenn ar pardaez -

Lennadenn Ia.- En Testamant koz, an Arh santel a oa
demeurans an Aotrou Doue e-kreiz e bobl; eun
arh santellohc'hoaz eo bet an Itron Varia, p'he deus
douget Mab Doue. Evel an arh oh antreal er gêr zantel,
ar Werhez a zo digemeret hirio e gloar an neñv.

PENNAD EUZ LEVR KENTA AN DANEVELLOU (15/3-4, 15-16, ha 16/1-2)

- 15/3. Ar roue David e-noa grêt boda pobl Israel a-bez e Jeruzalem,
evid lakad digas arh santel Doue d'ar gêr-se,
el leh kempennet gantañ eviti.
4. Bodet e-noa ivez an dud euz lignez Aaron, da lavared eo ar veleien,
hag ar re 'oa euz lignez Levi.
15. Bugale Levi, hervez m'e-noa gourhemennet Moizez diwar gomzou Doue,
a zo laket da zougen an arh santel,
gand barrinier, war o diouskoaz.
16. Ha David a lavar d'ar re 'oa e penn al Levited
lakaad euz o breudeur da ober kan ha muzik,
gand o binviou-seni, telennou, gitarou ha simbalennou,
evid lakad da dregerni toniou a levez.
- 16/1. Digaset eo bet eta arh Doue, ha roet dezi he flas
e-kreiz an deltenn e-noa David savet eviti;
sakrifisou peurlosket ha sakrifisou a beoh 'zo bet kinniget.
2. Hag ar roue David, echu gantañ lida ar zakrifisou-se,
e-neus benniget ar bobl a-berz an Aotrou Doue.

SALM 131 / 6-7, 8-9, 13-14 - Diskan: En ho sklerijenn gaer, Salver Jezuz,
E tigemerit ho Mamm evuruz.

6. Bez' on-noa klevet ano euz an Arh e korn-bro Efrata;
he havet on eus e mêziou ar Gergoad.
7. Deom d'al leh m'emañ, stouom e-harz skabell e dreid.
8. Savit, Aotrou Doue, da vond da leh ho tiskuilz,
c'hwi hag arh santel ho nerz.
9. Ho peleien ra vo santelez d'o gwiska,
ra drido gand levenez kalon ho tud fidel.
13. An Aotrou Doue e-neus dibabet kêr-Zion, evid dond enni da jom.
14. "Amañ 'vo leh va diskuiz da viken; amañ eo e plij din beva."
(pe: e vouran da veva)

Eil Lennadenn. - An treh war ar maro 'zo bet gounezet gand Or
Zalver; talvoud a ray evid an oll, ha da genta evid e Vamm.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (15/54-57)

54. Va breudeur, pa vo ar horv-mañ, tonket dezañ mond da vreina,
gwisket gand ar vertuz e lako divreinuz,
pa vo ar horv-mañ, tonket dezañ mervel,
gwisket gand ar vertuz e lako divarvel,
neuzé e teuio da wir ar homzou 'zo er Skritur Zakr:
55. Setu lonket ar maro, gounezet an treh warnañ;
Te, ar maro, e peleh emañ ganit da dreh?
Te, ar maro, e peleh emañ da 'flemm?
56. Flemm ar maro eo ar pehed; ha nerz ar pehed, al Lezenn.
57. Med, ra vo trugarekeet Doue,
eñ hag a ro deom an treh dre Or Zalver Jezuz Krist.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Eüruz an dud a zelaou Doue,
hag a vir e gomzou. - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ. (11/27-28)

27. Eun deiz m'edo Jezuz o prezeg d'eun niver braz a dud,
setu eur vaouez o sevel he mouez a-douez ar bobl, da lavared:

"Eüruz ar vamm a zo bet ouz ho tougen hag ouz ho maga!"

28. Ha Jezuz a respont:

"Gwellloh c'hoaz: eüruz an dud a zelaou komzou Doue, hag a vir anezo."

OREZONOU DERHENT GOUEL MARIA

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, (pe: Tad oll-halloudeg)

c'hwi ho peus taolet ho sellou war ar Werhez Vari, ho servicherez izel;
he dibabet ho peus da veza mamm d'ho Mab karet,
ha, da geñver an deiz-mañ, ho peus roet dezi ar gurunenn gaerra

roit deom ar hras, dre he fedennou, en ho kloar: *
pa 'z om bet prenet gand gwad Or Zalver,
da veza eun deiz, ni ivez, douget da hloar ar baradoz. Dre.....

WAR AR PROVOU.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue,

digemer ar zakrifis a beoh hag avveuleudi,
a ginnigom deoh hirio gand gouel Mamm Doue douget d'an neñv,*
ma talvezo deom an overenn-mañ da gaoud ho pardon,
ha da vaga ennom dalhmad anaoudegez vad en ho keñver. Dre J.K.O.Z.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Aotrou Doue, hirio om bet adarre maget gand ar bara euz an neñv: *
pa reom gouel Mamm Doue douget d'ar baradoz, e houlennom digand ho madelez
ma vim dizammet euz peb droug ha starteet en ho karantez. Dre J.K.O.Z.

GOUEL MARIA HANTER EOST / pe: Gouel Maria douget d'an neñv.

Lennadenn Ia.- Eur weledigez eo a zispleg deom an abostol
sant Yann: ar vaouez e-neus gwelet a zo eur skeudenn euz an
Iliz, an diaoul oh enebi outi; eur skeudenn eo ivez euz ar
Werhez Vari.

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND AN ABOSTOL SANT YANN (11/19a, 12/1-6, 10ab)

- 11/19. En deiz-se, an Aotrou Doue a oa digor e dempl a zo en neñv,
hag e weled ennañ arh santel e emgleo.
- 12/1. Eur zin burzuduz a zo bet gwelet en neñv:
eur vaouez gand an heol ouz he gwiska, al loar dindan he zreid,
ha war he fenn eur gurunenn a zaouzeg steredenn.
2. Dougerez e oa, ha krial a ree forz,
gwasket gand ar boan o lakaad he hrouadur er bed.
3. Eur zin all a zo bet gwelet en neñv:
bez' e oa eun aerouant (pe: dragon) braz, liou ruz-tan warnañ,
seiz penn ha deg korn dezañ, ha war e bennou seiz kurunenn;
4. Skubet e-neus gand e lost an drederenn euz stered an oabl,
ha stlapet anezo war an douar.
Chom a ra an aerouant a-zav dirag ar vaouez dare da henel,
evid lonka ar hrouadur kerkent ha ganet.
5. Laket he deus er bed eur mab, eur paotr,
an hini a dle beza pastor an oll boblou, eur walenn-houarn en zorn;
hag eo bet ar bugel tennet kuit ha douget daved Doue ha daved e dron.
6. Hag ar vaouez a zo tehet kuit beteg ar goueleh (pe: dezerd),
e-leh m'he deus eur plas kempennet dezi gand Doue.
10. Klevet am eus en neñv eur vouez kreñv, hag a lavare:
"Bremañ eo deuet da vad silvidigez, nerz ha rouantelez on Doue,
ha galloud meur e Zalver. (pe: e Grist)

SALM 44 / 11, 12, 14, 16. (Ar Salm a gomz euz merh eur roue estren,
dibabet da bried gand roue braz Israel)

*** Diskan ha poziou a hell beza kanet war don
ar Chapeled a hloar (Kantikou, n° 70.

Diskan: Ar Werhez gloriuz Vari, - E kreiz ar joa, ar vëuleudi,
..... Korv hag ene, a zo douget - D'ar baradoz gand an Eled.

- | | |
|--|--|
| 11. Selaouit, merh, ha sellit mad,
ha lakit digor ho tiskouarn;
en eur vond kuit, lezit ar zonj
euz tud ho pobl ha ti ho tad. | 14. En he haerra, setu o tond,
'barz ar palez merh ar roue,
gwisket ganti dillad neud aour;
he flahed enor 'zo d'he heul. |
| 12. C'hoant 'neus ahanoh ar roue,
Rag ho kened a blij dezañ;
Bremañ, pa'z eo Aotrou warnoh,
it 'ta da stoui dirazañ. | 16. Kaset eo tre e-barz an ti,
E kreiz ar joa, ar veuleudi.
Hi 'vo rouanez da viken,
E palez kaer 'n Aotrou Doue. |

Eil Lennadenn.- An treh gounezet war ar maro gand Or Zalver
a dalvezo evid an oll dud d'an deiz diweza; med evid ar
Werhez Vari, e Vamm, Doue n'e-neus ket gortozet.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (15/20-26)

20. Va breudeur, Or Zalver a zo savet a douez ar re varo,
an hini kenta euz an dud eet e kousk ar maro.
21. Evelse, koulz ha ma oa deuet ar maro dre eun dén,
dre eun dén ivez e teu an adsao da veo.
22. En Adam e varv an oll, en Aotrou Krist o do an oll ar vuez en-dro,

23. med pep hini en e renk: an Aotrou Krist da genta penn,
diwezatoch ar re 'zo d'an Aotrou Krist, da geñver e zistro.
24. Da houde, e vo echu peb tra,
pa lako e rouantelez etre daouarn Doue, e Dad,
goude beza diskaret peb nerz ha peb galloud a-eneb.
25. Rag eñ eo a dle kaoud ar garg a roue,
kén na 'no laket an oll enebourien dindan e dreid.
26. Hag an diweza enebour da veza diskaret e vo ar maro.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Ar Werhez gloriuz Vari... (cf. diskan ar Salm)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (1/39-56)

39. En amzer-se, (goude beza bet ar helou digand an El,) Mari 'zo eet en hent gand mall, warzu bro ar menezioù,
d'eur gêr a Vro-Juda.
40. Antreal a ra e ti Zakari, ha saludi Elizabed.
41. Kerkent ha m'he deus Elizabed klevet ar zalud gand Mari,
e-neus tridet ar hrouadur en he hreiz,
hag eo bet karget Elizabed euz ar Spered Santel.
42. Savet he deus he mouez, da lavared a-bouez penn:
"Benniget oh-c'hwi dreist an oll wragez,
ha benniget eo ar frouez euz ho korv!
43. Hag a beleh e teu din kement-mañ:
mamm va Aotrou o tond beteg ennon?
44. Rag, kerkent ha m'he deus mouez ho salud skoet va diskouarn,
e-neus ar hrouadur tridet em hreiz gand al levenez.
45. Eüruz an hini he deus bet feiz ha kredet e vo sevenet penn-da-benn
ar homzou lavaret dezi a-berz an Aotrou Doue."

46. Ha Mari, d'he zro, a lavar:

"Meuleudi a gan va ene d'an Aotrou,

47. ha tridal a ra va spered gand Doue, va Zalver,

48. ablamour m'e-neus taolet e zellou war e zervicherez dister.

Ya, diwar vremañ an oll dud, a rumm da rumm,

a lavaro ez on eüruz:

49 ken kaer traou e-neus grêt evidon

an hini 'zo braz e halloud, ha santel e ano,

50. hag a skuill e vadelez, a rumm da rumm, war an dud a zouj anezañ.

51. Dispala 'ra nerz e vreh: skuba an dud leun o halon a vrasoni,

52. diskar ar rouaned diwar o zron, hag uhellaad an dud izel;

53. ar re o deus naon a garg a vadou,

ar re binvidig a gas kuit heb netra.

54. E skoazell a ro da Israel, e zervicher,

rag ne zizonj ket e vadelez,

55. evel m'e-neus bet lavaret d'on tadou,

e keñver Abraham hag e lignez da viken."

56. Mari a zo chomet neuze gand Elizabed, war-dro tri miz,

ha goudeze eo eet en-dro d'ar gêr.

KAN AN DIGOR a hell beza ar hantik "Ni ho salud, o leun a hras" (n° 72),
pe, evid heulia al levr-overenn latin, kemer an ton hag an diskan
euz ar hantik-se, gand ar poziou-mañ:

1. Sin burzuduz gwelet en neñv: 3. Kanit d'an Aotrou kan nevez,
Eur vaouez gwisket gand an heol, Mari. Rag traou estlammuz e-neus grêt - Doue.
2. Hag al loar 'oa dindan he zreid, 4. Ra vo gloar da Zoue an Tad,
War he fenn daouzeg steredenn, Mari. d'ar Mab ha d'ar Spered Santel, bepred.

OREZONOU evid GOUEL MARIA

KEMPEDENN. - Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
ho peus laket dougen d'an neñv, korv hag ene,
an Itron Varia, gwerhez dinamm ha Mamm d'ho Mab karet,*
grit deom chom bepred or halonou troet warzu madou an neñv,
evid kaoud perz ganti en eürusted a hloar.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

WAR AR PROVOU -

Ra zavo davedoh, Aotrou Doue, ar zakrifis a ginnigom a greiz kalon;*
ha, dre bedennou ar Werhez gloriuz Vari, douget d'an neñv,
grit ma vo or halonou, entanet gand ar garantez,
troet dalhmad warzu ennoh. Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA. - Pedom oll a-unan...

Goude beza resevet Or Zalver er zakramant,
e houlennom diganeoh, Aotrou Doue,
dre ar Werhez Vari douget d'an neñv, on alvokadez vad dirazoh,
ma vim heñchet d'on tro beteg an alsao da veo ha gloar ar baradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

*** PREFAS ar Werhez Vari, el Levr-overenn-aoter, p. 49,

pe an hini a lakom er bajenn war-lerh, diwar ar Missale 1970 :

PREFAS AR WERHEZ VARI DOUGET D'AN NENV

E gwirionez, just ha santel eo
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, or Zalver.
Gwir abeg on eus d'ho kana laouen hirio,
pa 'z eo bet douget d'an neñv, korv hag ene,
ar Werhez Vari, Mamm da Zoue.
Enni e welom an hadenn genta hag ar patrom parfet euz hoh Iliz,
hag enni e kav ho pobl a zo er bed-mañ
eur gentel a esperans divrall hag a frealzidigez.
Rag c'hwi, Tad santel, n'eo ket fellet deoh
e vije taget gand breinadurez ar béz
ar vamm he doa douget ha ganet ho Mab, krouer ar vuez.
Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or moueziou d'ho meuli, e-kreiz al levenez:

An destenn latin: Vere dignum..... aeterne Deus: per Christum Dominum nostrum.

.....
Quoniam in caelos hodie Virgo Deipara est assumpta,
Ecclesiae tuae consummandae initium et imago,
ac populo peregrinanti certae spei et solacii documentum;
corruptionem enim sepulcri eam videre merito noluisti,
quae Filium tuum, vitae omnis auctorem,
ineffabiliter de se genuit incarnatum.
Et ideo, choris angelicis sociati, te laudamus, in gaudio confitentes:
